

**AR RAKGERIOÙ**

**Gab CHEREL**



## Ur ger a-raok

Ar studiadenn-mañ a voe skrivet gant Gab CHEREL e-tro 2013 ha talvezout a ra ar boan he lakaat war load PREDER, “gwellaet” un tammig an erouezadur anezhi — a gav dimp da nebeutañ — gant an amboaz aesaat al lenn. Kavet e vo atersoù a-berzh Gab<sup>1</sup> ha poent eo reiñ respontoù dezho, tri bloaz zo aet hebiou abaoe ma 'z eo aet da anaon d'ar pevar Eost 2021.

Dav lavarout un dra bennak da gentañ. Ar rakgerioù n'int ket sonnet ha d'ar muiañ e c'haller diverzhout enno durc'hadurioù ster. Skoemp eo neuze ober ur roll anezho gant despizadurioù *ne varietur*. Ar renabl savet gant Gab CHEREL a denn d'ar c'hemmadurioù derenet gant ar rakgerioù, a-benn o stabilaat en erdu an imbourc'herion hag ar yezherion, dre vras.

Evit a sell ar brezhoneg kempred eo mall sevel un nebeut binvioù dave a dalvezo da ziazezañ diorreidigezh ar yezh er bloavezhioù a zeu, ha kement-se war an holl dachennoù. E gerioù all : ober eus ar brezhoneg ur wir yezh a sevenadur, eleze gouest da ziraez al lavar planedennel, ha muioc'h c'hoazh da ginnig d'ar bed frouezh al labour sevenet drezañ. Kement-se a verko distro hon bro d'an istor.

YBAN, Kerzu 2024

---

<sup>1</sup>Gab a voe kelenner Gramadeg e SADED.



## AL LIESGERIADOÙ

E 1997 e savis ur pleustrad bihan a-zivout ar rakgerioù, en araez da ledañ deskadurezh e-touez an arveriadeg o pleustriñ dre ar yezh war un dachenn arbennik. Abaoe an amzer-se e voe embannet gant *Preder*, un toullad notennoù war an divoud er rummad LAVAR.

War c'houlenn un nebeud lennerion e 'm eus savet al labour nevez-mañ o tennañ d'al liesgeriadoù ha dreist holl d'an doare da gediañ an elfennoù anezho. Pennaouet 'm eus notennoù amañ ahont e LAVAR hag o c'hinniget evit lod e rezh taolennoù kevansell.

### I. DESPIZADURIOÙ

#### LIESGERIAD

Unvez c'heriadet o kediañ gant un unvez c'heriadet all war c'henel un unvez c'heriadet nevez.

- Mar bez an unvez nevez disoc'h eus kediadur ur pennrann gant un amc'her (rakger pe lostger), e komzer eus DEVERAD.
- Mar bez an unvez nevez disoc'h eus kediadur daou c'her ergeñveriñ e komzer eus KENSTROLLAD.

#### GER ERGEÑVERIÑ

"Ar yezhoniezh klasel a lak kemm etre daou seurt gerioù : ar gerioù o taveiñ d'ur werc'helezh trehontus dezho (Gl. *mots forts, principaux, autonomes, lexicographiques*, [...], Br. *gerioù ergeñveriñ*) hag ar gerioù o talvout da gevreañ ar re gentañ (Gl. *mots outils, accessoires, grammaticaux*, [...], Br. *gerioù benveg [benveg c'her]*)".

E berr, c'hoarvezout a ra ar *gerioù ergeñveriñ* eus ar pennanvioù, ar verboù, an adanvioù, an adverboù hag ar *gerioù benveg* eus an araogennoù, skorelloù, h.a.

#### RAKGER

Hiziv ne vez ket bevennet hevelep keal d'ar "rakgerioù gwirion": *an-*, *di-*, *gour*, h.a., met dedalvezet ivez da gement elfenn ouzhpennet e deroù ur roadenn. Ur rakger a c'hell bezañ :

- ▷ ur verb : *spluj* ;

- ▷ ur pennanv : *bed, dour, penn, rann* ;
- ▷ un adanv : *berr, bras, fall, hir, kent, meur* ;
- ▷ un adverb : *buan, na, nann, nemeur, pell* ;
- ▷ un araogenn : *etre, rak* ;
- ▷ un niver : *un, kentañ, daou, div, eil, tri, teir, trede, mil* ;
- ▷ ur rannig : *re* ;
- ▷ nep elfenn all, dreist holl er furm gempred eus ar yezhoù : ur ger mell : *anun* ; ul lizherenn latin, gresianek pe all :  *$\alpha$ -1-antitrypsin, betaprouad* ; ur sifrenn : *17- ketosteroid*, h.a. ken ma teu ar rakger da vezañ, e degouezhioù 'zo, un diforc'hekaer hep mui, hep durc'hadur ster amparet e-kerz istor ar yezh.

### Dav eo menegiñ diouzhtu ur gudenn :

Mar kedier ur rakger (pennanv da skouer) hag ur penrann diforzh (pennanv da skouer) e tisoc'h un DEVERAD evel despizet a-zioc'h.

Sk. :  $pa_1 + pa_2 = \text{DEVERAD}$

Mar kedier daou c'her ergeñveriñ (daou bennanv da skouer), e tisoc'h ur C'HENSTROLLAD evel despizet amañ a-zioc'h

Sk. :  $pa'_1 + pa'_2 = \text{KENSTROLLAD}$ .

Perak ha penaos dispartiañ neuze an deveradoù diouzh ar c'henstrolladoù mar bez gant an eil re hag ar re all an hevelep luniadur e degouezhioù 'zo :  $pa. + pa.$  da skouer ?

Da respont e ranker ur wech ouzhpenn lakaat kemm etre *furm* hag *arc'hwel* an unvezioù geriadel :

- $pa_1$ , dezhañ ur furm bennanvel, met un arc'hwel rakger ;  $pa_2$  dezhañ ur furm bennanvel hag un arc'hwel penrann.
- $pa'_1$  dezhañ furm hag arc'hwel ur ger ergeñveriñ ;  $pa'_2$  dezhañ ivez furm hag arc'hwel ur ger ergeñveriñ.

N'eo ket dibouez hevelep diforc'hekaat pa ro tu d'ober reiz war luniadoù sellet betek henn evel nemedenoù, pe evel furmoù iskriv a chomfe andispleg a hent all.

Perak *penndir* ha *penntir* da skouer ?

- E *penndir* ez eus gant *penn-* arc'hwel ur rakger : *penndir = tir pennañ*. DEVERAD eo *penndir*.

- E *penntir* avat e vir *penn-* arc'hwel ur ger ergeñveriñ : *penntir* = *beg an tir* = *beg douar*. KENSTROLLAD eo *penntir*.

Heñvel dra evit *penngêr* = *gêr vrasañ eus un tiriad*, Gl. *capitale* (GIBR). DEVERAD eo *penngêr*. *Pennkêr* = *darn bellañ eus ar gêr*, Gl. *bout du village* (CHal meneget e GIBR). KENSTROLLAD eo *pennkêr*.

## KENSTROLLADOÙ : MELLEGEZH HA DIVELLEGEZH

Anezhio furmoù kurzhet eus ar gerioù *mellsteriegezh* ha *divellsteriegezh* a-getep.

"Ul luniad mell(steri)ek zo dezreadus e ster diwar ster e gedrannoù, pezh nad eo ket ul luniad divell(steri)ek pa forc'h e ster diouzh ar ster gortozet diwar zezrann e luniadur."

Skouerioù :

~ ul luniad mellek : *leddivezouriezh* : aes eo anaout *led* ha *divezouriezh*.

~ ul luniad divellek : *dial* = *di-* + *gal* : diaes eo anaout *di* ha *gal*.

Diwar-bouez an hevelep kedrannoù zoken, e c'hell ar yezhour sevel daou liesgeriad disheñvel.

Skouerioù :

1) *ad-* + *talañ* : *adtalañ* luniad mellek (*talañ* un eil gwech) ; *atalañ* luniad divellek (merkañ ur c'heñver a barder etre kementadoù) nad eo ket dezreadus e ster diwar ster ar c'hedrannoù ;

2) *di-* + *gounid* : luniad mellek *dic'hounid* (hep *gounid*) ; luniad divellek *diounid* (reiñ ul lia d'ur gouziviad).

## Rummañ an deveradoù hervez staelad ar rakgerioù a ya d'ober o elfenn gentañ

E-touez ar rakgerioù e tiforc'her ar rakgerioù pur *ad-*, *da-*, *ez-*, h.a. elfennoù n'o deus ster piaouel ebet pa vezont diged, diouzh ar rakgerioù eildorn anezho unvezioù o virout un talvoud sterel drezo o unan *bras-*, *fall-*, *gwall-*, na pa vent kediet pe ziked.

Perak hevelep rummadur ? Peogwir ez eus gant ar rakgerioù pur un hanren kemmadurioù liesseurtekoc'h eget hini ar rakgerioù eildorn, ar re-mañ o tegas war-bouez nebeut an hevelep kemmadurioù hag ar c'henstrolladoù a-gevandod evel dezrevellet en taolenoù da heul.

## RUMMAÑ AR C’HENSTROLLADOÙ HERVEZ AR C’HEÑVER A ZO ETRE AN ELFENNOÙ ANEZHO :

### KENSTROLLADOÙ A-GEVELDOD HA KENSTROLLADOÙ A-GEVANDOD

**Kavout a reer daou rumm keñverioù :**

1. Ur c’heñver a geveldodiñ, azonet gant ezvezañs un amzalc’h gramadegel etre an elfennoù. En ur c’henstrollad a-geveldod (pe keveldodad) ez eus ur staelad kevarzh d’ar c’hedrannoù. Evit a sell ar skrivadur, hervez ar boazioù o ren e vez elfennoù ar c’heveldodad :

~ pe kediet : *dourkevionel* ;

~ pe unanet dre ur gedell : *barr-bevañ, dour-gwin, maen-milin-azen* ;

~ pe diged : *planken skoaz*.

2. Ur c’heñver a gevandodiñ, azonet gant bezañs un amzalc’h gramadegel etre an elfennoù.

Kinniget ez eus bet tri hent da studiañ modoù an amzalc’h er c’henstrollad a-gevandod (pe kevandodad) :

a) an hent neuziadurel o tiforc’hiñ an elfennoù evel stirann hag amrann (rakrann pe lostrann) ;

b) an hent kevreadurel ouzh o c’hevenebiñ evel doareer ha doareed ;

c) an hent ambredadurel oc’h ober eus an eil kedrann ar penndod hag eus eben ar c’hetod.

### I. Hent neuziadurel

Loc’homp eus ur skouer gwriziennet mat er yezh : *gourfaoterekaat*.

En un doare hollek e tezreveller : *Gour-* rakger ; *-paot-* pennrann ; *-erekaat* lostger teirrann.

Er gerlunierzh e tegaser kentoc’h an termenoù ketep : *rakrann, stirann, lostrann*.

#### Rakrann

Elfenn ouzhpennet e deroù ur roadenn vonegel hag o strishaat he erdal

Er C’hramadeg, e tiforc’her *a*) ar RAKRANN LAVARADEL (*war gan, da heul*) *b*) ar RAKRANN C’HERIADEL pe RAKGER (*diskan, amheuliañ*) ; *c*) ar RAKRANN YEZHADEL pe RAKVERB.

#### Stirann ha lostrann



Ur wech dibourc'het al liesgeriad *gourfaoterekaat* eus kement isparzh (*gour-* hag *-erekaat*) e chom ar pennbarzh anvet STIRANN (*-paot-*), anezhi ar "poent eoriañ" a stager outañ an amrannoù (ar rakrann *gour-*, al lostrannoù *-erekaat*, h.a.).

## II. Hent kevreadurel

Studienn renet o c'hevenebañ doareer ha doareed.

### A. Luniad doareer + doareed

An doareer a c'hell bezañ :

- ur verb : *lonktraezh* ("traezh o kinnig lonkañ ar baleer")
- ur pennanv :
  - klokaenn amkan : *kigdebrer* ("a zebr kig, a ra eus ar c'hig e vagadur pennañ")
  - klokaenn amgorzh : *aerdeiñ* ("beajiñ dre aer")
  - klokaenn bennanv : *mordrouz* ("trouz ar mor")
- un adverb : *buandalm* ("talm buanaet ar galon")
- un adanv : *hirhoali* ("dezhañ un hoali padek").

Tra ma vez an doareed :

- ur verb : *morgurañ* ("kurañ diwar-bouez an dour mor")
- ur pennanv : *dourgi* ("«ki» o vevañ en dour"), *douryar*.

### B. Luniadur doareed + doareer

An doareed a c'hell bezañ :

- ur verb : *torr-penn*
- ur pennanv : *ki-dour*, *yar-dour*

tra ma vez an doareer :

- ur verb : *tro-c'hervel*
- ur pennanv : *debrer-pep-boued*
- un adanv : *kan-plaen*.

### III. Hent ambredadurel

Elfennet eo bet an hent ambredadurel gant GUY ÉTIENNE.

Studiañ modoù an amzalc'h er c'henstrollad a-gevandod, dre un hent pe un all, a gevaraez sevel un daolenn glok eus hanren ar c'hemmadurioù e-barzh al liesgeriadoù.

**I. Er c'heveldodadoù :** amzalc'h gramadegel ebet etre an elfennoù, kemmadur ebet : *dourkevionel ; klev-gwel ; sav gwel*

#### II. Er c'hevandodadoù :

- luniet doareer + doareed, e kemm dre wanaat kensonenn gentañ an doareed :

1. — (G a gemm e C'H) ; GW e W ; (D e Z) ; B e V, M e V, forzh pe sonenn a ve e dibenn an doareer ;
2. — K a gemm e G ; P e B ; T e D ; (G e C'H) ; GW e W ; (D e Z) ; B e V ; M e V, pa vez e dibenn an doareer pe ur sonenn pe unan eus ar c'hensonennoù (C'H), L, M, N, R, V.

Ar c'hrommelloù ouzh G ha D a verk kemmadurioù "bresk" o revout pe get.

Ar c'hrommelloù ouzh C'H a verk e vez kemmadur goude *sonenn + c'h* : *bouc'hzremmek ; luc'hdredan ; luc'hgizidik*, met n'eus kemmadur ebet goude *kensonenn + c'h* : *erc'htrell, erc'htrev*.

- luniet doareed + doareer. Pa c'hoarvez an doareed eus ur pennanv benel unan pe eus ur pennanv den gourel lies, e kemm dre wanaat kensonenn gentañ an doareer :

1. — (G/C'H) ; GW/W ; (D/Z) ; B/V ; M/V, forzh pe sonenn a ve e dibenn an doareed ;
2. — K/G ; P/B ; T/D ; (G/C'H) ; GW/W ; (D/Z) ; B/V ; M/V, pa vez e dibenn an doareed pe ur sonenn pe unan eus ar c'hensonennoù (C'H), L, M, N, R, V.

A-wechoù eo diaes anaout pehini eus elfennoù ar c'henstrollad a ranker sellout evel doareer pe evel doareed. Skouer : Br. *dendarv*, Gr. *Minôtauros*, euzhvil ? euzhden ? Ar c'hemmadur T/D degaset en elfenn gemmadus gant kensonenn *n* diwezhañ an elfenn gemmeiat a verk ul luniadur doareer + doareed : neuze *dendarv* a arouez un *tarv*, ur *mil*, un *euzhvil* dezhañ perzhioù un den. Kenkoulz eo avat sellout ouzh *dendarv* (*den ha tarv*) evel ur c'heveldodad ezvezañs ennañ a amzalc'h gramadegel etre ar c'hedrannoù. Da neuze e ve faziek ar c'hemmadur T/D. Ar skouer-mañ digunvez a ziskouez pegen forc'hellek e c'hell bezañ ar c'heñver a gevandodiñ er c'henstrolladoù enno da elfenn gentañ gerioù evel *rann, penn, mamm*, h.a. Elfennet eo bet amañ a-us da skouer an daou liesgeriad stummet gant *penn* ha *tir* :

~ *penndir* (DEVERAD) = *tir pennañ* (doareer *penn* + doareed *tir*, kemmadur T/D en arbenn eus *n* kensonenn diwezh an elfenn gemmeiat) ;

~ *penntir* (KENSTROLLAD) = *beg an tir* (doareed *penn* + doareer *tir*, hep kemmadur).

Pell emamp diouzh ar reolennoù dezrevellet gant hon diaraogerion pa zalc'hent kont dreist holl eus al luniad anataet e rannoù al liesgeriadoù. Alese ar pouez roet da lizherenn diwezhañ an elfenn gemmeiat ha diwar neuze ar skrivadoù dic'hortoz a-wechoù, pezh na vir ket ouzh ar yezherion d'ober hiziv gant ar skrivadoù degemeret a bell 'zo.

Kent pep tra e rank ar yezhour derc'hel kont hiviziken eus ar ster da reiñ d'al liesgeriadoù ha diferañ strizh ar reolennoù evit o stummañ.

"Ha n'eo ket deuet ar mare", a aters YANN-BAOL AN NOALLEG e 2007, "da reiñ un taol skubellenn er c'hemmadurioù war-lerc'h ar rakgerioù, *da reiñ reolennoù ?* Rakwelout a ran ur prantad turmudus war dachenn ar sevel gerioù er bloavezhioù o tont. Deuet mat e vo seurt skoueriekadur". Ha GUY ÉTIENNE da respont : "Ya, dav eo peurstardañ ar serjantoù e par ar c'hemmadurioù diabarzh", ha da ouzhpennañ : "Ya d'an taol skubellenn roet d'ar stummoù dizunvan (evel da skouer ar c'hemmadurioù goude *dreist-*) ; ya ivez avat d'an nemedennoù gwriziennet (evel da skouer *etrevroadel, eilgevor*) daoust ma rankor pleidiñ gant pep degouezh ha kevareizhañ a-wechoù ".

## Penaos pleustriñ ar reolennoù ?

1. En ul lankad kentañ e tifluk ur gedrann nevez da respont d'un ezhomm yezhañ. Nep arveriad a zegas e gavadenn en nevid gant mui pe vui a verz.
2. En un eil lankad ez emell ar gramadegour o klask poellekaat degasadenn ar yezher.

### Ur skouer :

E DGVB 92 e revez an hBr. *budicolma*. "La glose signifie littéralement *place du vainqueur*, rendant, de loin, le sens de «socle, piédestal» du latin *lapis per uictorie, uel crepido*." Dezneuziadur Br. *buzigelva* a hañvale klotañ dreist gant ar c'hevatal d'ar Gl. *podium* a glaske degas ar yezher. Distroadet e voe e c'hinnig dre an abeg ma n'eus mui gant div rann eus al lostger ar ster a oa o hini gwechall : *-ig-* ne verk mui an oberour, *-el-* ne verk mui an erdal. Muioc'h 'zo : gwall hir eo ar ger evit ar yezh arnevez, dreist holl e tachenn ar sportoù

3. Trede lankad : o vezañ ma vez poell er yezherion, e ra berzh dre voaz reolennoù ar c'hramadeg. Betek ur par avat rak ouzhpenn poell a vez e mab den hag e c'hoarvez d'ar yezhañ — evel da bep arz — troziñ ar reolennoù, pe ac'hoel lakaat harz d'ar reolennoù.

Amañ e teraou roll ar santerezh diwar goust ar poell. E tachenn an arz e vez piaouel kenan abegoù an dibab-mañ dibab graet gant an "arzour" hervez lusk e gizidigezh. E meur a lec'h ez arbouez Guy

ÉTIENNE war an arvez-mañ : "Dit da welout", a skriv d'ur c'henskriver : "evel ma *santez* [...] teskad an termenoù rakgeriet [...], n'eo ket evel un heuliad enmonedoù geriadur, met evel broustoù bountus eus *da askre*", hag e lec'h all : "An dibab kemmañ pe ankemmañ goude rakrann a zeuas ganin ent emdarzh, diwar lusk an teod, hep ober stad eus ur reolenn da gemplegañ dezhi. [...]. Da zifenn va c'hinnigadenn ne 'm eus nemet an arguzenn : evel se e *klevan* an traoù". Arguzenn barnet garv gant Goulven PENNAOD e anv reizhstoregezh ar yezh.

Hevelep dael etre "barzh" ha "gouezoniour" a ziskouez anat pegen kizidik e vez arver ar c'hedrannoù, ar rakgerioù pergen.

Mar bez al liesgeriañ e dalc'h "santerezh arzel" ar yezhour, na pa ve evit lod hepken, daoust ha kandreizh eo neuze sevel taolennoù eus durc'hadurioù ster ar rakgerioù ?

Ya, rak, daoust d'ar soutilderioù dezrevellet, e vez rakgerioù o tougen un durc'hadur ster amparet e-kerz istor ar yezh. Evito — ar rakgerioù skiantel pergen (da skouer Br. *gour-*, Gl. *hyper-*, *super-* er Jedoniezh hag er Fizik) — e vez "sonnet skalfad o durc'hadur [...] evel ma tere ouzh yezh ar saveleñoù". Met evit ar rakgerioù skoempoc'h o arver e chom digor an nor war an dazont, betek re zoken e meur a zegouezh ken ma revez stummoù dizunvan a vo ret skarzhañ.

## II. TAOLENN AR RAKGERIOÙ PUR

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ab</b>	K	P	T	C'H	W	Z	V	V	" <b>mab</b> " en anvennoù : <i>Abanna</i> ; <i>Abherve</i> Sl. VALL XXVIII ; <i>Str</i> 135
<b>Ad</b>	K	P	*	C'H	W	**	V	V	dirak ur verb (= rakverb) : " <b>arren, adarre</b> " : <i>adergrafañ, adober, adsevel, advonegañ</i> dirak ur pennanv : " <b>eilrenk, skoazell, astenn</b> " : <i>adfoar, adhent, adkudenn, adstal, advoger</i> Sl. DGVB 53, 76 ; VBEG 371, 372 ; VALL XXVIII ; DEBR 118-119 Sl. EMSA 126 10 hh. Sl. La-07 38 ; La-08 93, 104, 117, 137, 168, 236, 239, 299 hh. <i>adkenderc'hañ ; adproduiñ ; adc'houleva- dus ; adwereañ ; advroañ ; advemor</i> * ad- + t- → adt- : <i>adtalañ ; adteurel, adti ; adtreiñ</i> (mellsterieg) * ad- + t- → at- : <i>atalañ, atreiñ</i> (divellsterieg) **ad- + d- → add- : <i>addeskiñ</i> (mellsterieg) **ad- + d- → at- : <i>aterc'hañ</i> (divellsterieg) ad- + h- → adh- : <i>adhent</i> (mellsterieg) ad- + h- → at- : <i>atebiñ, atoriñ</i> (divellsterieg)

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Am	G	P B*	D	C'H Ø**	W	Z	B V***	V	<p>"en-dro da" : <i>amlenn, amwiskad</i>            "e-kichen" : <i>amezeg</i>            "en erlec'h ouzh" : <i>amsaviñ</i>            "damnac'h, damziouer" : <i>ameeun, amlavar, amleal, amliv, amc'houlouù, amzileizh</i>            "nann" : <i>amhouarnek</i>            "an eil hag egile" : <i>amrev, amster</i>            Et. "ecto" : <i>amarvevad</i>            Et. "peri" : <i>amgalonenn, amglopenn, ampeleñn</i>            Sl. DGVB 60 ; VBEG 371 ; VALL XXVIII ; DEBR 411, 412            Sl. La-06 66 ; La-08 104, 141, 176, 188, 192 ; La-10 28, 59, 60, 310, 394 ;            La-11 76, 187 ; La-13 40, 41 ; La-15 17, 18, 366 ; La-17 48, 49, 71, 72, 152-154, 304, 323  <i>amgevrediñ ; ampoblek ; amdreiñ ; amc'heriañ ; amwad ; amzileizh ; ambredañ ; amvagadur</i>            * <i>amblijus</i>            ** <i>amouenn, amouiziek</i>            *** <i>amvankel, amveziad, amvoud</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>An(n)</b> (kreñvaat)	G	B	D	C'H	W	N	V	V	<p>"dreistelezh - muioc'h diouzh ar badelezh eget diouzh an ampled" : <i>angrid</i> - muioc'h diouzh ar saviad eget diouzh an ober : <i>annez ; anwrid</i> - muioc'h diouzh an ental eget diouzh an erdal" : <i>angerzh, anren</i> Sl. DGVB 63 ; VBEG 371 ; HYZH 178 15 hh. Sl. La-05 65, 87 ; La-07 17, 38, 39, 71 ; La-08 64, 65, 80, 172 ; La-17 44, 263, 393 <i>anglevout ; ; andennadel ; anc'havael ; anweadur ; annodiñ ; anvirviñ ; anvenek</i> an- + n- → ann- : <i>anneuz</i> * an- + d- → ann- : <i>annodiñ</i> an- + t- → and- : <i>andalañ</i> an- + h- → ann- : <i>ann(h)ebad, annaeriñ</i> Notenn. An(n) (kreñvaat) a zegas B/V ha M/V an (nac'hañ) a zegas ivez B/V ha M/V. Da ziforc'hiñ an daou, e vez kinniget skrivañ hiviziken : an(n)- (kreñvaat) + b- → annv- : *<i>annvirviñ</i> an(n)- (kreñvaat) + m- → annv- : *<i>annvenek</i> an- (nac'hañ) + b- → anv- : <i>anveli</i> an- (nac'hañ) + m- → anv- : <i>aventadel</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>An</b> (nac'hañ)	K	P	T	G	GW	D	V	V	" kontrol, nac'hañ groñs, diouer razh, ezvezañs " : <i>ankoun, anhun, antrugar</i> Sl. DGVB 63 ; VBEG 371 ; VALL XXVIII Sl. La-05 87 ; La-07 87 ; La-08 176, 181, 266, 326 ; La-10 29, 59, 60 ; La-11 95 ; La-15 18 ; La-17 49, 358 <i>ankeltiek ; anperzhok ; antrevn ; angeriañ ; angwelladus ; andislev ; anvezus ; anvicherel</i>
<b>Ar</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	"dirak, tost" : <i>argaeenn, armor, arzorn</i> "war, war c'horre, war ar marc'had" : <i>arc'hopr</i> "arvez kempadel" : <i>arvar, andreug, argaezh</i> Sl. DGVB 70 ; VBEG 371, 372 ; VALL XXIX Sl. La-04 33, 59 ; La-08 64 ; La-09 385 ; La-10 178, 311 ; La-15 351 ; La-17 69, 354 <i>arganteul ; arbell ; ardrouz ; arc'hopr ; arwellaat ; arzeuat ; arvevañ ; arventenn</i> *ar- + gouestl → arouestl
<b>Arc'h</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	"a-us da, dreist" : <i>arc'hael, arc'heskob</i> Sl. VALL XXIX ; ; ; ; <i>arc'hdrouiz ; arc'hbeleg ; arc'hmestr</i>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Arem</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>emober + prientiñ</b> " : <i>aremodiñ, arempred, aremrannañ</i> Sl. La-16 27 ; ; ; <i>aremc'her</i> ; ; ; <i>aremvac'h</i> ;
<b>Arou (Arwa)</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>kemboniañ</b> " : <i>arouleviañ, arouluniañ</i> " <b>arc'hediñ</b> " : <i>arougoriñ, arouhebiñ</i> Sl. La-09 322, 323 ; La-17 352 hh. <i>arouglev ; aroubred ; aroudriñ ; ; arwastadiñ ; arouzodiñ ; ;</i>
<b>Asken</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>stumm arall eus</b> " (diforc'hekok'h eget <i>all, arall</i> ) : Et. " <b>allo-</b> " : <i>askenneuziad, askensoniad, askenrizh</i> Sl. La-11 226

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Az</b>	*	**	***	G	GW	****	B	V	<p>"arren" (kreñvoc'h eget <i>ad-</i>) : <i>azgoulenn, aspediñ</i></p> <p>"kenderc'hel da" : <i>askouezhañ, astenn</i>            Sl. VBEG 371, 372 ; VALL XXVIII            Sl. La-07 38 ; La-08 64, 93, 192, 239, 299 hh.,            325 ; La-09 221 ; La-10, 189, 190 ;            La-11 424  <i>azgenel ; azgwerzhañ ; azbenañ, azbec'hiañ ; azverkañ</i>            * <i>az- + k-</i> → <i>ask-</i> : <i>askenderc'h, askouezhañ</i>            ** <i>az- + p-</i> → <i>asp-</i> : <i>aspiaouañ, aspleustr</i>            *** <i>az- + t-</i> → <i>ast-</i> : <i>astreiñ</i>            **** <i>az- + d-</i> → <i>azd-</i> : <i>azdoublañ</i> (mellsterieg)            **** <i>az- + d-</i> → <i>ast-</i> : <i>astalañ</i> (divellsterieg)  <i>az- + s-</i> → <i>ass-</i> : <i>assammañ</i></p>
<b>Bes</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p>"eil, dindan" : <i>besarlevier, beskadoriad</i>            Sl. VALL XXIX  <i>beskonsul ; ; ; ; ; besmaodiern, besmorvezzen</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Dam</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V *B	V	<p>"tro-dro da" : <i>dambredañ</i>  "diglok " : <i>damgas, damwelout</i>  "hogos" : <i>damarun, dambar, damskeud</i>  "evit lod" : <i>damc'hleb, damrakemek, damfaos</i>  "o tennañ da" : <i>damc'hlas, damruz, damzu</i>  "mui pe vui" : <i>damwriennet</i>  "dispriz, krak-" : <i>dambriz, damyoul</i>  Et. "demi-, semi-" : <i>damarne, danvoull</i>  Sl. DGVB 128 ; VBEG 376 ; VALL XXXI, EC 11 436  Sl. La-17 362  <i>damgoun ; dambleuskañ ; damdonn ; damc'houlou ; damwir ; damzeskiñ ; damvev ; damvarv</i>  <i>*dambredañ sellet evel deverad eus ambredañ</i></p>
<b>Dan</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"danded" : <i>daneizik, dangoad, dangreizenn ; danlec'hiañ, dansten, danvol, danzorn</i>  Et. "hypo-" : <i>dannaoziat, dangreizenn</i>  Et. "infra-" : <i>danadeilad, danatomel, danframm, danluniad, danruz</i>  Sl. DGVB 128  <i>dangor ; danbolitikel ; dando ; danc'havaelañ ; danwiskad ; danzouar ; danvevad ; danvor</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Dar</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	<p>"<b>kreñvaat, gourlakaat, destrizhañ</b>" : <i>darsod, darblegañ</i></p> <p>"<b>trumm</b>" : <i>darlusk, darwallad, darzont</i></p> <p>"<b>feuls</b>" : <i>daraez, darstekiñ, darlakaat, darsav</i></p> <p>"<b>dre nerzh</b>" : <i>darluiñ, darsankañ, darwantad</i></p> <p>"<b>forzhañ</b>" : <i>darfiñv, darhent</i></p> <p>"<b>a-dreuz</b>" : <i>daraozad, darrizh, darvennoz</i> "<b>dic'hortoz</b>" : <i>darvoud, dargouezh, darveziad</i></p> <p>"<b>andiarvenn</b>" : <i>dargrezañ</i></p> <p>"<b>en-dro da</b>" : <i>daremprediñ</i></p> <p>Et. "<b>meta-</b>" : <i>darskridad, darsoniad, darveizad</i></p> <p>Sl. DGVB 129 ; VBEG 376 ; VALL XXXI, XXXVIII</p> <p>Sl. La-09 154, 416 ; La-10, 205 ; La-11 167 ;</p> <p>La-12 117 ; La-14 183 ; La-17 93</p> <p><i>dargemm ; darboellañ ; dardennañ ; darc'hav (?) ; darwallad ; darzerc'hañ ; darvoud ; darveizad</i></p> <p>* dar- + gou- → darou- : <i>darouezañ ; darouluz</i></p>
<b>Dasken</b>	G	B	D	G	W	D	V	V	<p>"<b>diseurt, liesdoare</b>" : <i>daskendouezad</i></p> <p>Et. "<b>allo-</b>" : <i>daskendiriat</i></p> <p>Sl. La-09 156, 175 ; La-10 284 ; La-11 226</p> <p>; ; <i>daskendeñvañ</i> ; ; ; <i>daskenvod</i> ;</p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Daz (Das)</b>	*	**	***	G	GW	D	B	V	<p>"distreiñ d'ar par kent" : <i>dazbriañ, daskoriñ, dazlec'hiañ, daspreñañ, dastalañ</i></p> <p>"eil gwech war-enep" : <i>dastaol, dazgwered, dasstourm</i></p> <p>"arren lies gwech un argerzh en egor pe en amzer" : <i>daskreñañ, daspegañ, dastroc'hañ, daskrignat</i></p> <p>"dont a-dreuz o tegerc'hañ" : <i>dasklevout, daspakañ</i></p> <p>Sl. VALL XXXI Sl. La-05 62 ; La-07 71, 72, 91 ; La-08 85, 93, 278 ; La-09 221; La-10 189, 190 ; La-11 142 ; La-17 363 <i>dazglenañ ; dazgwrezer ; ; dazbroañ ; dazvellekaat</i></p> <p>* daz- + k- → dask- : <i>daskavout, daskemm, daskounañ, daskurzhañ</i></p> <p>** daz- + p- → dasp- <i>dasparzh , dasperzhiañ, daspiaouañ, dasporzhiañ</i></p> <p>***daz- + t- → dast- <i>dastarzh, dastenn, dastreiñ, dastroc'hañ</i></p> <p>daz- + f- → dasf- <i>dasfaoutañ, dasforzhañ</i></p> <p>daz- + h- → dash- pe dazh- <i>dasheñvelaat, dazhentiñ, dazhaenad</i></p> <p>daz- + s- → dass- <i>dassav, dasssez, dasson, dasssteriet, dassugañ</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>De</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p>"lusk war-du": <i>deborzhiñ</i></p> <p>"kas etrezek" : <i>delizhañ, degas, deren, desevel, deverañ, dezougen</i></p> <p>"ambroug, lakaat da"</p> <p>"o verkañ ar c'hentod a-ziavaez" : <i>defiñval</i></p> <p>Sl. DGVB 130 ; VBEG 376 ; VALL XXXI</p> <p>Sl. La-10 306 ; La-12 232 ; La-13 13, 14 ; La-17 76</p> <p><i>degemezañ ; deberzhek ; dedroadel ; dec'heriañ ; dewezhiañ ; dezerc'hañ ; devarn ; deverkañ</i></p> <p>* de- + gou- → deou- : <i>deouezañ, deourekaat</i></p>
<b>Der</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p>"dreistkreñvaat" : <i>derluskañ, derouezañ, derreviñ, derveur</i></p> <p>"war-raok gant feulster, gant destrizh" : <i>dergas</i></p> <p>Sl. DGVB 135 ; VBEG 376</p> <p>Sl. La-10 174 ; La-12 117 ; La-14 185 ; La-17 44</p> <p><i>dergoal ; ; ; derc'hallañ ; ; ; dervantiñ ; derveno</i></p> <p>* der- + gou- → derou- : <i>derouezañ</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Dez	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"ergoreladur": dezvarn, dezrannañ</p> <p>"mont war-du gant resisted" : dezgeriañ, deznaouiñ, dezneuziañ, dezren, dezventañ</p> <p>"da vat" : dezastum</p> <p>"divizout" : dezvredañ</p> <p>Sl. HYZH 178 22, 23</p> <p>Sl. La-04 32 ; La-07 71; La-12 307, 308 ; La-14 363</p> <p>dezkelañ ; ; ; dezgavaelañ ; dezwezhiañ ; ; dezvonnañ ; dezverkañ</p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Di</b> (kreñvaat)	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p>"<b>kreñvaat</b>" : <i>diarc'hañ, dieulañ, dilammat, dilaoskiñ, diredek, diregiñ, disec'hañ</i></p> <p>"<b>argouezh peurveradel</b>" : <i>diogeliñ</i> Sl. DGVB 136 ; VBEG 377 ; HYZH 178 24 hh. Sl. La-17 155, 356 <i>digarzhañ ; dibenn ; didennañ ; dic'haloupat ; diwan ; dizoug ; diverraat ; diverzhout</i> * di- + gou- → diou- : <i>diounit</i> (divellsterieg) Sl. Diou- amañ dindan</p>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Di</b> (forc'haat)	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	<p>"lemel, kuitaat , nac'hañ, diouer, ezvezañs" :</p> <p>"kontrol" : <i>dilaouen</i></p> <p>"forc'haat" :</p> <p>~ na - : <i>disall, diangorzh</i></p> <p>~ hep - : <i>dic'hlav, diuern</i></p> <p>~ paouez : <i>dic'hoarzhin, divanac'h, diselaou</i></p> <p>~ pellaat : <i>distekiñ</i></p> <p>~ lemel : <i>digabestrañ, dizourañ</i></p> <p>~ forc'hiñ : <i>distagañ</i></p> <p>~ dioueriñ" : <i>diarc'hant, didrugar, dihun, diwel</i></p> <p>Sl. DGVB 136 ; VBEG 376, 377 ; VALL XXXII</p> <p>Sl. La-08 266, 326 ; La-15 18, 162 ; La-17 355</p> <p><i>diglañvour ; diboell ; didoueziañ ; dic'harvad ; diwered ; dizesk ; divec'hiañ ; divellekaat</i></p> <p>* di- + gouiziegezh- → diouiziegezh</p> <p>di- + sonennoù → diz- a-wechoù (mesket ma vez gant dis-) : <i>diehan</i> ha <i>dizehan</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Dia</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p><b>"Rakger pur da stummañ :</b>  ~ <b>treanvadoù</b> : <i>diagiz, diaserzh, diastok</i>  ~ <b>treverboù</b> : <i>diagreskiñ</i>  ~ <b>treadvebadoù</b>" : <i>diabell, diagent, diac'houde</i>  Sl. HYZH 178 29, 30  Sl. La-07 83  <i>diagent ; diabar ; diadreuz ; diac'hinad ; diawelout ; diazalc'h ; diaved ; diavaez</i>  * dia- + gou- → diaou- : <i>diaouezañ</i></p>
<b>Dian</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	D	V	V	<p><b>"heuliad"</b> : <i>dianeost</i>  Et. <b>"post-"</b> : <i>dianbore, diandaraez, diansell</i>  Sl. DGVB 137 ; VALL XXXII ; HYZH 178 31  Sl. La-08 11, 12 ; La-09 327, 371  <i>diangleñved ; dianbore ; diandreñ ; dianc'havaeladus ; dianwered ; dianderc'hañ ; dianvarr ;</i>  * dian- + gou- → dianou- : <i>dianouezañ</i></p>
<b>Diar</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p><b>"diwar, o tont eus "</b> : <i>diarbell, diardreñv, diarlun, diarneuz, diarroz, diarsol</i>  Sl. La-07 18 ; La-08 329  <i>diargarr ; diarbale ; diardreug ; ; ; diarzoug ; ; diarvenn</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Diou</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>dazont</b> " : <i>diougan</i> Et. " <b>pre</b> " : <i>diouzerc'h</i> Sl. La-09 321, 421; La-13 13, 14 ; La-17 355 hh. <i>diouglevout ; dioubarzhañ ; ; ; ;</i> <i>diouzerc'hañ ; diouvegañ ; diouvennañ</i>
<b>Dir</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>dreistkreñvaat</b> " : <i>diraez, dirfeud, dirgended, dirgendalc'hek</i> Sl. HYZH 178 32, 33 Sl. La-15 351 <i>dirgel ; ; *dirdi ; *dirc'havael ; dirwerc'hek ; ; dirvoud ; dirveur</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Dis (Diz)</b>	K	P	T	G	GW *	D	V	V **	<p>"nac'hañ" : <i>disnaon</i></p> <p>"kontroliañ, pellaat, hepkoriñ" : <i>disglaviñ, dishualañ, dishêriañ, dispiaouañ</i></p> <p>"arren" : <i>diskan, distreiñ</i></p> <p>"kreñvaat" : <i>disgwalc'hiñ, disgwennañ, distav, disgwinkal</i></p> <p>Et. "a-" : <i>disnoa</i></p> <p>Et. "anti-" : <i>disrampus</i></p> <p>Sl. DGVB 144 ; VBEG 377 ; VALL XXXII</p> <p>Sl. La-05 87, 88 ; La-09 385 ; La-10 59, 60 ; La-14 334 ; La-17 185, 207, 273, 274</p> <p><i>diskas ; dispuilh ; distrevnañ ; disgougel ; disgwallañ ; disderc'hel ; disvountañ ; disvergl</i></p> <p>* nemet <i>diswennañ ; diswirionez ; diswriat ; diswriennañ</i></p> <p>**nemet <i>dismegañ</i></p> <p>dis- + sonennoù → diz- : <i>dizargrezañ ; dizehan ; dizintrudu ; dizonest ; dizunvan</i></p>
<b>Drek</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"a-dreñv, war-dreñv" : <i>drekleur, drekkouezh</i></p> <p>Et. "retro-" : <i>drekkorzhañ, drektorzienn</i></p> <p><i>drekkouezh ; drekprenestr ; drektalenn ; ; drekwerenn ; ; drekdaousilh ; ; drekverk</i></p> <p>drek- + sonennoù → dreg- : <i>dregamveziadur ; dregempenn ; dregisverk ; ; dregussilian</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ec'h (sl. Ez)</b>				Ø*					<p>"eus, er-maez a" : <i>ec'hamzerel, ec'harc'hwel, ec'harver</i>  Orin <i>Ec'h-</i> : * eks-  * eks- a ya :  — da ez- dirak ur gensonenn (nemet <i>c'h-, h-</i>).</p> <p>Sl. Ez- amañ dindan  — da <i>ec'h-</i> dirak ur sonenn :  <i>ec'haozañ ; ec'hegor ; ; ec'hodiñ ; ec'huziñ</i>  — da <i>e-</i> dirak <i>c'h-, h-</i> : <i>ec'hoar, ec'hwel</i>  Sl. DGVB 154 ; VBEG 378, 379 ; VALL XXXII  Sl. La-09 154 ; La-11 81, 82  * <i>ec'h-</i> + galloud → <i>ec'halloud</i>  * <i>ec'h-</i> + gouiziel → <i>ec'houiziel</i>  * <i>ec'h-</i> + gouluniañ → <i>ec'houluniañ, h.a.</i></p>
<b>EI</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"liested" : <i>elanvet, elsonenn</i>  Et. "poly-" : <i>elanvet</i>  Sl. La-11 138 ; La-13 190  <i>elgensonenn ;</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Em	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p>"<b>emod</b>" : <i>emarselliñ, emframm, emgorf, emgresk emnac'hañ, emskiant</i></p> <p>"<b>kenemod</b>" : <i>emgannañ, emunaniñ, emzvizout</i></p> <p>Arver ar rakger pur <i>ken-</i> zo araezus da lakaat kemm etre emod ha kenemod : <i>emstouiñ (an unan)</i> ha <i>kenstouiñ (an eil hag egile)</i> ; <i>emstrivañ (an unan)</i> ha <i>kenstrivañ (an eil hag egile), h.a.</i></p> <p>Met e meur a zegouezh e vez dreistezhomm <i>em-</i> er furmoù <i>emX</i> pa vez bastus ar stumm <i>X</i> hepken. Sl. in GIBR niver ar verboù troet gant Gl. <i>Y</i> ou se <i>Y</i> : <i>stouiñ</i> hag <i>emstouiñ</i> ; <i>astenn</i> hag <i>emastenn, h.a.</i></p> <p>"<b>amod</b>" : <i>ematers, embrezeg, emc'houlenn, emsoñjal, embrederiañ</i></p> <p>Et. "<b>auto-</b>" : <i>emvarn, emzeskad, emzezrann, emziarlunius</i></p> <p>Et. "<b>homeo</b>" : <i>emwrezat</i></p> <p>Sl. DGVB 157 ; VBEG 378 ; VALL XXXIII</p> <p>Sl. La-08 141, 175 hh. ; La-13 318, 319 ; La-15 17, 20, 21, 161, 366 hh. ; La-16 27 ; La-17 83</p> <p><i>emgorf</i> ; <i>emberzh</i> ; <i>emdouell</i> ; <i>emc'heriañ</i> ; <i>emwazerezh</i> ; <i>emzviz</i> ; <i>emvastañ</i> ; <i>emvoustrañ</i></p> <p><i>em-</i> + <i>gouX</i> → <i>emouX</i> : <i>emouestl, emouez, emouinañ</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Eo</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>mat, kaer</b> " : <i>eogren, eolez, eoluc'hek, eorizh</i> Sl. DGVB 168 ; VBEG 380 ; HYZH 178 34, 35 <i>Eogevrant, eogreizet ; eoboell ; ; ; ; ;</i>
<b>Er</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V **	" <b>mont da, dirak, war-raok</b> " : <i>erbediñ, erduañ, ergerzhout, erzont</i> " <b>a-dal da</b> " : <i>ergorañ</i> Et. " <b>pre-</b> " : <i>ergurva</i> Et. " <b>pro-</b> " : <i>ergediñ, erluskañ, ervannañ</i> Sl. DGVB 162 ; VBEG 378 ; VALL XXXIII Sl. La-08 293 ; La-14 334 ; La-17 225 <i>ergentaou ; erbarañ ; erdenñañ ; erc'havaelañ ; erwezhañ ; erziwezh ; erveziat ; erverkañ</i> * er- + gouX → erouX : <i>erouezañ, erounit</i> **nemet <i>ermegañ</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ez</b> (≈ er-maez) (sl. Ec'h)	K *	P	T	G **	W	D	V	V	<p>"eus, er-maez a" : ezaodat, ezkounañ, ezwaz</p> <p>"diouer" : ezkorfel, ezvezañ</p> <p>"nac'hañ" : ezkomzel, ezrevout, ezteodel</p> <p>Et. "ex, exo" : ezporzhiañ, eztourzhañ, ezpriediñ</p> <p>Et. "extra-" : ezien, ezkein, ezlavarel, eztreiñ</p> <p>Sl. DGVB 165 ; VBEG 378, 379 ; VALL XXXII ;</p> <p>Sl. La-09 154 ; La-11 81, 82 ; La-17 48, 49, 215 ezkas ; ezpun ; eztiañ ; ezgeriañ ; ezwerc'hañ ; ezdiuz ; ezvenañ ; ezvuzul</p> <p>* nemet eskantañ ; eskemm, h.a.</p> <p>*#ez- + -gen (-ien) → ezien</p> <p>ez + c'h- → ec'h : ec'hoar, ec'hwel</p> <p>ez- + h- → °ezh- : °ezhentiñ, °ezheuliañ, °ezhontiñ</p>
<b>Ez</b> (a voe)	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p>"o vezañ bet, paouez a vezañ" : ezkannad, ezmarksour, ezrener, ezskoliad</p> <p>Et. "ex-" : ezdic'hweleg, ezpoliser, ezstourmer</p> <p>Sl. La-10 59</p> <p>ezkloareg ; ezpoliser ; eztrevadenn ; ezgouarnour ; ezgwreg ; ezderc'houezour ; ezbrezeliad, ezbrobenn ; ezmaodiern, ezmilour</p>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Gar</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>berr, bihan</b> " : <i>garliz</i> Et. " <b>mini</b> " : <i>garventoniezh, gareilañ, garskeudenniñ</i> Et. " <b>mikro</b> " : <i>garfoue, garvev</i> Sl. VALL XXXIII <i>gargel ; garbig ; gardenn ; ; garwaskañ ; garzentek ; garvev ; garventekaat</i>
<b>Gou (Sl. Gwa-, Gwe)</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V *	" <b>al leided</b> – <b>derez bihanoc'h un doaread</b> : <i>gouboazh, goudomm, gouyen, gouvezv</i> – <b>mod bihanoc'h un ober</b> : <i>gouganañ, gougemer, gougomz, gougousket, gouleze, gousailhañ, gousellout</i> – <b>stumm bihanoc'h udb.</b> " : <i>gogleze, gouguzh, goustraed, gouyezh</i> <b>"an danded</b> – <b>an dindan en egor</b> : <i>goubenner, gousol, gouverkañ</i> – <b>an dindan en amzer, eleze ar goude</b> : <i>goudrigañ, goulerc'hiñ</i> – <b>an dindan dre leterc'hañ</b> " : <i>goubrenañ, goulakaat, gouskor, goustennañ, gouvennoz, gouvidañ</i> <b>"ar vonded</b> – <b>goubarañ ar furm pe al lusk un ergorenn pe un argerzh</b> " : <i>goulev, goulizh, goulun, gouluz, goustur</i> <b>"an trezanañ</b> – <b>trezanañ anvel : degas ub. pe un udb. dindan an aoz merket gant ar stirann</b> : <i>goubredañ, gouganañ, gougantañ, gougevaniñ,, goulankañ, gouzelviñ, gouzerc'hañ, gouzerc'hel</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù Kendalc'h ar bajenn a-raok
									<p>– <b>trezanañ verbel, ar verb disoc'h o vezañ treodel</b>" : <i>goublegañ, goudaviñ, goudreiñ, gougediañ, gouskoeviñ</i>  Et. "<b>hypo-</b>" : <i>gouvozenn, gouzerc'hvel</i>  Et. "<b>sub-</b>" : <i>goudrovanel</i>  Sl. DGVB 180, 194 ; VALL XXXIV  Sl. La-08 77, 279 ; La-09 289 ; La-10 90, 153, 154 ; La-17 118, 119, 349-351, 353, 355  <i>gougorfañ ; goubarzhelezh ; goudaoliñ ; gouc'heriañ ; gouwerzhekaat ; gouzerc'hañ ; gouvriad ; gouvennañ</i>  * nemet <i>goumezañ</i>  gou- + sav → <i>gouzav</i>  E degouezhioù 'zo ez a Gou- da Gwa-, Gwe- ; sl. Gwa-, Gwe- amañ dindan)</p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Gour</b>	C'H	F	Z	G	W	D	B	M	<p>"ar muided  – derez brasoc'h un doaread :  <i>gourdesk, gourfar, gouruhel</i>  – mod brasoc'h un ober :  <i>gourfaoterekaat</i>  – stumm brasoc'h udb." :  <i>gourglazard, gourhent, gourliorz</i>  <b>"emell destrizhus"</b> : <i>gourderc'hel, goursellout, gourlakaat</i>  Et. <b>"hyper-"</b> : <i>gourdiñs, gourmarc'had, gourzaoliñ</i>  Et. <b>"super-"</b> : <i>goureoullustr, gourstal, goururzhiataer</i>  Et. <b>"ultra-"</b> : <i>gourarnevez</i>  Sl. DGVB 198 ; VBEG 386 ; VALL XXXIV  Sl. La-11 45, 46 ; La-15 23 ; La-17 93  <i>gourc'hemenn ; gourfenn ; gourzaoliñ ; gourgallv,ourgoulenn ; gourwareziñ ; gourditour ; gourbarr ; gourmarc'had</i></p>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Gwe (Gou, Gwa)</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	Sl. Gou- "izelded" : <i>gwehin, gwele, gweleviat</i> Sl. La-08 279 ; La-09 272 ; La-14 374
<b>Gwen</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	"meidiñ – <b>diarvenn</b> : <i>gwenc'hoarzhin</i> – <b>arverk</b> " : <i>gwendag</i> Sl. VALL XXXIV Sl. La-09 89 <i>gwengel ; ; gwendarzh ; Gwenc'hlan ; ; ; gwenvrazhañ ;</i>
<b>Han</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"a-ziforc'h" : <i>handalañ, haneilañ, hanc'herieg</i> "dont er-maez" : <i>hanvout</i> "disrannañ ; dispartiañ" : <i>hanbarzhañ</i> "dre heg" : <i>hangas</i> "an disparti, an dibarek, ar piaouel" : <i>hangren, hanlec'hiañ, hansez</i> Sl. DGVB 206 Sl. La-09 350, 401, 406 ; La-12 117 ; La-17 111, 201 <i>hangaeañ ; hanbarañ ; handuek ; hanc'heriañ ; hanweañ ; handerc'hañ ; hanved ; hanverk</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>He</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	<p>"aes" : <i>hedorr, heglenk, heloc'h, hewel, hewerzh, hezoug</i></p> <p>"mat" : <i>hegarat, helavar, heren, heson, hevag</i></p> <p>"reol" : <i>hevec'h, hevent, hevoll, hewask</i></p> <p>Et. "eu-" : <i>heandizhañ, hevredus</i></p> <p>Et. "ortho-" : <i>hegomz</i></p> <p>Sl. DGVB 207 ; VBEG 380 ; VALL XXXIV</p> <p>Sl. La-10 434</p> <p><i>hegerz ; hebleg ; hedrevn ; hec'hleb ; hewask ; hezileizh ; hevec'h ; hevez</i></p> <p>* he- + gouez- → heouez-</p>
<b>Il</b>	G	B *	D	C'H	W	D	V **	V	<p>"ster amspis" : <i>ilbrad</i></p> <p>"o werediñ a-rekin" : <i>ildaol, ilderc'hañ, ildro</i></p> <p>"o werediñ a-zestrizh" : <i>ilren</i></p> <p>Sl. La-08 38, 39 ; La-11 40 ; La-17 117</p> <p><i>ilgroaz ; ilbrad ; ildalañ ; ; ; ildougen ;</i></p> <p>;</p> <p>* <i>nemet ilpenn</i></p> <p>**<i>nemet ilboud</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Is</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"<b>dindan</b>" : <i>isaveiñ, isdiorren, isegor, isgoulev, iskevandir, iskorf, isskridañ, isvarrañ</i></p> <p>"<b>damziouer</b>" : <i>isleegezh, isvec'h</i></p> <p>Et. "<b>hypo-</b>" : <i>iseraez, isgrenn, iswrezter</i></p> <p>Et. "<b>infra-</b>" : <i>issten</i></p> <p>Et. "<b>sub-</b>" : <i>isemouez, iskerc'hellder, islavarenn, isrann, isrenk, isurzhañ</i></p> <p>Sl. DGVB 230 ; VALL XXXV</p> <p>Sl. La-10 29 ; La-14 50</p> <p><i>iskenderc'h ; ispoent ; isteskad ; isgoprañ ; iswask ; isderc'houezañ ; isvleinañ ; isvagañ, isvorañ</i></p>
<b>Kant</b>	K	P	T	C'H Ø*	W	Ø**	V	V	<p>"<b>kentizhegezh, kuit a bellekaat en egor, en amzer pe en devezout</b>" : <i>kantouezañ</i></p> <p>"<b>nesaegezh, diabarzhded, kreziou</b>" : <i>kantaezañ, kantalc'h, kantvout</i></p> <p>"<b>gant, e-ser</b>" : <i>kantamsaviñ, kantanv, kanteul, kantlizhañ, kantren, kantster</i></p> <p>Sl. DGVB 95, 96 ; VBEG 372</p> <p>Sl. La-08 293 ; La-10 348, 365 ; La-14 57</p> <p><i>; kantpoell ; kanttreiñ ; ; ; ; kantvredañ kantveizel</i></p> <p>* kant- + gouez → kantouez</p> <p>**kant- + dalc'h → kantalc'h ; **kant- + derc'hañ → kanterc'hañ ; **kant- + dezv → kantezv</p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ke</b>	G	B	D	C'H Ø*	W	Z	V	V	" <b>an eil war arbenn d'egile</b> " : <i>keharzañ</i> Et. " <b>co-</b> " : <i>kegor, kehebiant, kevahel, kevuzul</i> Sl. La-09 36 ; La-10 73, 74 ; La-17 381 <i>kegraoñell ; keberiad ; kedric'horn ; ; keweziñ ; kezelvad ; kevodadañ ; kevent</i> * ke- + gouenn → keouenn
<b>Ked</b> ( <i>Ket</i> dirak kenson- ennoù amglev)	*	**	***	****	W	*****	V	V	" <b>a-unan, a-gevret</b> " : <i>kedamezeg, kedamzeriañ, keddalc'houriezh, kedlec'h, kednerzh, kedvoaien, kedvreur, kedvuhez</i> Et. " <b>co-</b> " : <i>kedtrec'hegezh</i> Et. " <b>inter-</b> " : <i>ketal</i> Sl. VBEG 373 ; VALL XXX ; HYZH 178 40 hh ; Da-63 18 Sl. La-10 73, 74 <i>ketkevret ; ketpar ; ketal ; kedouezañ ; kedweziañ ; keddalc'hel ; kedvuhez ; kedveno</i> * ked- + k- → ketk- : <i>ketkevret</i> ** ked- + p- → ketp- : <i>ketpar</i> ** ked- + t- → ket- : <i>ketal, keteuzel</i> *** ked- + t- → kedt- : <i>kedtrec'hegezh</i> **** ked- + g- → ked- : <i>kedal, kedouez</i> ***** ked- + d- → kedd- : <i>keddalc'hel</i> ***** ked- + d- → ket- : <i>ketodiñ</i> ked- + (h)aez- → <i>ketaez-</i> ked- + her → <i>kether</i>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Kel</b>									" <b>boutin etre, strollennel</b> " : <i>kellavar, kellizh</i> Et. " <b>co-</b> " : <i>kellinañ, kelluzadezh</i> Et. " <b>iso</b> " : <i>kelloadek</i> Sl. La-10 324 ; La-14 184 ; La-17 381 kel- dirak l- → <i>kell-</i> : <i>kellies, kelluskañ</i>
<b>Kem</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>kevelded</b> " : <i>kemmagad, kemmoed</i> Et. " <b>iso-</b> " : <i>kempadrezh</i> Sl. La-17 381 ; <i>kemperzh, kemplegañ ; ; ; ;</i> <i>kembeli ; kemmesk</i>
<b>Ken</b> (sl. <i>Ken</i> rakger eildorn)									
<b>Ket</b> (sl. <i>Ked</i> )									
<b>Keur</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>pikol</b> " : <i>keureog, keurzelwenn</i> Et. " <b>macro-</b> " : <i>keurvolekul</i> Et. " <b>mega-</b> " : <i>keurvleñcheg</i> Et. " <b>ultra</b> " : <i>keurskeul</i> Sl. VALL XXX <i>keurgazh ; ; ; keurwazhiedegezh ;</i> <i>keurzelwenn ; keurvleñcheg ; keurvil</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Kev</b>									<p>Et. "co-" : <i>kevahel, kevargemmañ,, kevastenn</i></p> <p>Et. "inter-" : <i>keveskemmus</i></p> <p>Sl. La-07 17 ; La-17 381</p> <p>kev- dirak ar sonennoù : <i>kevamsaviñ ; kevementegañ ; keviunañ ; kevosodiñ ; kevuziañ ; keveyzhañ</i></p> <p>kev- dirak l- → kefl- : <i>kefleel, kefliv, keflusk</i></p> <p>kev- dirak n- : <i>kevnadiñ, kevnesaat, kevneuziad</i></p> <p>kev- dirak r- : <i>kevrannañ, kevreañ, kevrollañ</i></p> <p>kev- + heb- → <i>kefeb-</i></p> <p>kev- + hourzh- → <i>kefourzh-</i></p>
<b>Kevel</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	<p>Et. "juxta-" : <i>keveldeuziñ, keveldodiñ, kevelstrollañ</i></p> <p>Et. "para-" : <i>keveldrevnañ, kevelc'heriañ</i></p> <p>Et. "syn-" : <i>kevelverzh</i></p> <p>Sl. La-09 96</p> <p><i>kevelgantvoudek ; ; keveldreizhañ ; kevelc'heriañ ; ; keveldodiñ ; kevelvukañ ; kevelverzh</i></p>
<b>Kor</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"tro, mont war gelc'h" : <i>koramsaviñ, korc'hwez</i></p> <p>"distreiñ" : <i>korluzañ, korredañ, korsonenn, korsten</i></p> <p>Et. "retro-" : <i>korwerediñ</i></p> <p>Sl. DGVB 118 ; VALL XXXI</p> <p>Sl. La-05 62 ; La-10 347 ; La-15 266</p> <p><i>korgensonenn ; korbellañ ; kordaoliñ ; ; korwered ; ; korvoneg ; korvell</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Led</b>	K	P	*	C'H	W	D** T***	V	V	<p>"war un tu hepken" : <i>ledenez, ledvab, ledverb</i></p> <p>Et. "<b>demi-</b>" : <i>ledplaenenn, ledsammer</i></p> <p>Et. "<b>hemi-</b>" : <i>ledazoniad, ledkorf, ledseizi</i></p> <p>Et. "<b>pseudo-</b>" : <i>ledistor, ledeskeuliadell</i></p> <p>Et. "<b>semi-</b>" : <i>ledergorenn, ledfrankiz, ledlinennek, ledsoliadel</i></p> <p>Sl. DGVB 241; VBEG 382 ; VALL XXXV</p> <p>Sl. La-10 199</p> <p><i>ledkeltiek ; ledpenn ; ; ; ledwered ; leddigor ha leterc'hañ ; ledvlein ; ledvicheriad</i></p> <p>* led- dirak t- → let- : <i>leti, letu</i></p> <p>** led- dirak d- → ledd- : <i>leddedaol, leddigor, leddivblezh</i></p> <p>*** led- dirak d- → let- : <i>leterc'hañ, letodiñ</i></p> <p>led- + heñvel- → leteñvel-</p>
<b>Les (Lez) (faos)</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"faos"</p> <p>Et. "<b>pseudo-</b>" : <i>lesanv, leztad</i></p> <p>Sl. DGVB 241</p> <p><i>leskleizad ; ; leztad ; ; ; lesdispac'hel ; lezvab, lezverc'h</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Mar</b> (skrivet <i>Mor a</i> wechoù)	G	B	D	C'H	W		V *	V	<p>"bras" : <i>marlonk, marnaon, marnec'het</i>  "disprizus" : <i>marvelen</i>  "dismegus" : <i>moranv</i>  "un tammig" : <i>morgemmañ, morglañv, morgousk</i>  "kalz, penn da benn" : <i>maraonik, morfoll, morvitellañ</i>  "dedreiñ gorrek" : <i>mordreiñ, moroksidañ</i>  Et. "pseudo-" : <i>mardroad</i>  Sl. VALL XXXV, XXXVI  Sl. La-17 198  — Skrivad <i>Mar</i> :  <i>margalon, margediel ; marbluñv, marboan ; mardroad ; ; ; ; marvrant ; marvelen</i>  * nemet <i>marblev</i>  — Skrivad <i>Mor</i> :  <i>morgablus ; ; mardroad ; ; ; ; ; ; ; ;</i></p>
<b>Mes</b>	K	P	T						<p>"faziek, fall" : <i>meskalon, meskontañ, mestaol</i>  Sl. VALL XXXV  <i>mesklev ; mesplaen ; mestaol, mestu ; ; ; ; ; ; ; ;</i></p>
<b>Mez</b> (kreiz, diabarzh)	K	P	T	C'H					<p>"kreiz" : <i>mezc'her, Mezheven</i>  "diabarzh" :  — <i>alvezel</i> : <i>mezkerzhel, meztroc'hañ</i>  — <i>dre leterc'hañ</i> " : <i>mezonded</i>  Sl. DGVB 252  Sl. La-11 82  <i>mezkreskiñ ; ; meztermen ; mezc'her ; ; ; ; ; ; ; ;</i></p>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Mez (komz, logik)</b>	K	P	T				V	V	" <b>komz</b> " : kv. <i>emezad</i> " <b>logik</b> " : <i>mezframm, meziant, mezlun, mezoni</i> Sl. DGVB 252 Sl. La-09 385, 445, 449 ; La-10 117, 144 ; La-16 284 ; <i>mezpar ; meztrevn ; ; ; ;</i> <i>mezventer, mezhvin</i>
<b>Mi</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>direol</b> " : <i>miazasadur, migeharz, migenglot</i> " <b>fall, noazus</b> " : <i>mihanduek, miwered</i> " <b>strafuilh</b> " : <i>migorvez, mineuzid</i> Et. " <b>dys-</b> " : <i>miarc'hwel, milenn, miskriv</i> Sl. DGVB 256 ; VBEG 382, 383 Sl. La-05 88, 89 ; La-09 148 ; La-10 29 <i>migomz ; mibar ; mideñvañ ; mic'houlun ; miwel ; mizlid ; mivoud ; mivezhur</i>
<b>Mor (sl. Mar)</b>									
<b>Mous</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	" <b>bihanaat</b> " : <i>mouskomz, mouslavarout</i> Sl. VALL XXXVI <i>mouskanañ ; mouspenniñ ; moustañvañ ; mousgoanag ; ; mousdaveiñ ; ;</i> <i>mous- + stag- → moustag-</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>OI</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>diouer</b> " : <i>olarc'hant, olboued, oldour, oltireoul</i> Sl. VALL XXXVI Sl. La-08 378 ; La-09 102 <i>olkevala ; ; oltrelosk, oltud ; olgounid ; olgwerzh ; oldilhad ; olboued ;</i>
<b>Pe</b>	K *	P **	T	G	GW	D	B	M	" <b>ansavelet</b> " : <i>peden, pederc'hadegezh, perann</i> Sl. La-07 94, 95 ; La-12 253 <i>; peparrez ; petra ; pegiz ; ; pedeiz ; ; pementad</i> <i>* pegementiñ, stumm kozh bet miret e anBr</i> <i>** pebezh, stumm kozh bet miret e anBr.</i> Notenn. Er furmadur <i>pe- + stal</i> → <i>pestal</i> ez eus anv a <i>pe</i> a gaver e <i>prenestr</i> , ha neket ag ar Rakger pur studiet <i>pe(zh)</i> .
<b>Peur</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>klok , da vat</b> " : <i>peurnoazh, peursklaer, peurunvan, peurv</i> Sl. DGVB 291 ; VBEG 383 ; VALL XXXVI Sl. La-10 245 <i>peurgorvoiñ ; peurbad ; peurdremen ; peurc'hallekaat ; peurwerzh ; peurzarbenn ; peurvec'hiañ ; peurvoulañ</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Peuz	K	P	T	G	W	D	V	V	"hogos" : <i>peuzvat, peuzvarv, peuzwirion</i> Et. "quasi-" : <i>peuzkestal, peuzrannig</i> SI. VALL XXXVI <i>peuzkelc'hiek ; peuzpare ; peuztost ; ; peuzwenn ; peuzdodiñ ; peuzvev ; peuzvelen</i>
Pil	G *	B *	D *	C'H	W	Z	V	V	"disprizus" : <i>pilgerc'h</i> "bihanaat" : <i>pilpasañ, piltrotat</i> SI. VALL XXXVII SI. La-08 39 <i>pilgroaz ; ; ; pilwerzhañ ; ; ;</i> * <i>nemet pilkoad ; pilpasañ ; piltrotat</i>
Rak (Rag dirak sonennoù)	K *	P	T	G	W	D	V	V	"a-raok" : <i>rakpaeañ, raksoñj, rageost, rakward</i> Et. "ante-" : <i>ragarveziñ, rakdeiziañ</i> Et. "pro-" : <i>ragazon</i> Et. "pré-" : <i>ragarveziñ, rakreiñ, raksavelañ</i> SI. DGVB 292 ; VBEG 383 ; VALL XXXVII <i>rakkambr ; rakprenañ ; raktebiñ ; rakgeriañ, rakgouiziel ; rakwalarneg, rakwelout ; rakdiuzañ ; rakvarn ; rakveno</i> * <i>rak- + kuit- → rakuit-</i> <i>rak- + sonennoù → rag- : raganv ; rageeun ; ragistor ; ragoberiañ ; ragurzhiadiñ</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Ras	K	P	T	G	W		V	V	"gwered a-c'horre" : <i>raskignat, rasparediñ, rastraolañ</i> SI. VALL XXXVII SI. La-07 48 ; La-17 125 <i>raskignat ; raspaotr ; rastrezerc'h ; ; ; ; ;</i>
Re	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	"dreist penn ; reñver" : <i>rec'hoantegezh, refiziout, reher, revec'hiañ</i> SI. DGVB 291, 292, 294, 297 ; VBEG 383, 384 ; VALL XXXVII <i>regas ; rebriziañ ; redizh ; rec'halloud ; rewered ; rezrougiezh ; revarr ; revuzul</i> * re- + gouiz- → reouiz-
Skil	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	"bihanaat" : <i>skildrenk, skilbaotr</i> SI. VALL XXXVII <i>skilbaotr ; skildrenk ; ; ; ; ;</i>
Soul	G	B	D	C'H	W		V	V	"dreist" : <i>soulc'hoari, soulniñvañ</i> "re" : <i>soulgargañ, soulbrenañ</i> SI. VALL XXXVII <i>soulgresk ; soulbaeañ ; ; soulc'houlenn ; soulwerzhañ ; ; soulvrudañ ;</i>



Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Tar</b>	G	B	D	C'H *	W		V	V	"a denn d'un embreg torfedel" : <i>targemediñ, tarouloc'hañ, tarwazañ</i> "evit lod" : <i>tarvoal</i> "fall" : <i>targlev, tarlonkañ</i> Sl. DGVB 129 ; VBEG 384 ; VALL XXXVIII Sl. La-09 154 ; La-16 205 <i>targemediñ ; ; ; tarwazañ ;</i> <i>tarvac'hañ ;</i> tar- + gouloc'h- → tarouloc'h-
<b>Tor</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	"a-dreuz, dismeg" : <i>torc'hweniañ, torgammañ ; torgleuz, torlonkañ</i> Sl. VALL XXXVIII <i>torbilat ; torgleuz ; ; ; ; ;</i>
<b>Tra</b>	C'H	F	Z	G	GW	D ha Z	B	M	"en tu hont, dreist" : <i>tramor, trarez</i> Et. "extra-" : <i>traletodiñ</i> Et. "meta-" : <i>trabedoniañ, trajedoniez, tralavar</i> Et. "super-" : <i>trastenel</i> Et. "supra-" : <i>trahaezel, trahiniennel</i> Et. "trans-" : <i>trabevenn</i> Et. "ultra-" : <i>traberr, trameneziat</i> Sl. DGVB 317 ; VBEG 296, 384, 385 Sl. La-03 88 <i>trac'hantañ ; trafell ; trazrobarzh,</i> <i>trazeiñ ; tragwarellek ; tradeziat,</i> <i>trazomm ; trabed ; tramouezhiadel</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Tre</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	"dreist, en tu all da" : <i>trebarzhiñ, trevariañ, trewaner</i> "eskemm" : <i>treverbañ</i> Sl. DGVB 318 ; VBEG. 297, 384, 385 ; VALL XXXVIII Sl. La-13 40 <i>tregerzhañ ; trebadout ; tredizhañ ; trec'haoliñ ; trewerzhañ ; trezerc'hel ; trevonnañ ; trevouezhiadel</i> * tre- + gouez- → treouez-
<b>Uc'h (Sl. Us)</b>									
<b>Ue</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	"ambi-" : <i>uezehouiad, uezrec'hek</i> "bi-" : <i>uegeñver, uesturiadell, uelinennegezh</i> "amph-" : <i>ueion, ueleizhid, uelen, uevoc'hat</i> Sl. La-10 374 ; La-11 21; La-16 128 ; La-17 154, hh. <i>uegarrezek ; ; ; ; uezelviñ ; uevir ;</i>

Rakger pur	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Us</b> (Uc'h dirak sonennoù)	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"dreistelaat" : usrez  "reñver" : ustroazh, usvag, usvarrañ  Et. "hyper-" : uc'herdal, usstiek, usvent  Et. "ultra-" : ussten  Sl. DGVB 326 ; VBEG 297, 385 ; HYZH 178 48  Sl. La-08 181; La-17 196  uskrennañ ; <b>uspriziañ</b> ; usteñv ;  usgouluzañ ; uswask ; usdigelañ ;  usvec'h ; usventañ  us- + sonennoù → uc'h- : uc'harnesâd ;  uc'heraez ; ; uc'horged ; uc'hurzhiad ;  uc'hyez</p>
<b>Ye</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>Et. "cryo-" : yebarañ, yegalvezerezh,  yegurañ  Sl. La-10 95, hh. ; La-17 43  yegrinañ ; yebarañ ; yedreluc'h ;  yec'haner ; yewarell ; yezalc'her ;  yevevoniezh ; yevezegañ</p>

## III. TAOLENN AR RAKGERIOÙ EILDORN

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>All</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	<p><b>"diforc'h"</b> : <i>allfurm, allizhañ, allskriv, allyezh</i>  Et. <b>"hetero-"</b> : <i>allwrez, allspesadien</i>  SI. DGVB 58  SI. La-10 306 ; La-11 226  <i>allgar ; ; alldreiñ ; allc'hrez ; allwerc'h ; allzelviñ ; ;</i>  * all- + gouenn- → allouenn-  all- + lizh - → allizh-</p>
<b>Arall</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	<p><b>"a-ziforc'h"</b> : <i>arallhin, arallvro, arallyezh</i>  Et. <b>"allo-"</b> : <i>arallgorvez, arallson</i>  Et. <b>"hetero-"</b> : <i>aralliv, arallren, arallreviat</i>  SI. DGVB 58, 70 ; SI. VALL XXIX  SI. La-11 226  <i>arallgenel ; ; aralldrohed ; ; arallwrezek ; ; arallvro ;</i>  * arall- + gouenn- → arallouenn-  arall- + liv- → aralliv-</p>
<b>Bann</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	<p><b>"e amgant ar Fizik"</b> : <i>bannhent, bannlec'hed</i>  SI. VALL XXIX  SI. La-09 42  ; ; <i>banndresadenn ; ; ; ;</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Barr</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	Sl. DGVB 80 Sl. La-08 298 ; ; ; <i>barrc'hoprañ</i> ; <i>barrwezañ</i> ; ; ; <i>barrventer</i> * <i>barr-</i> + <i>gen-</i> → <i>barrien-</i>
<b>Bed</b>	K	P	T	C'H	W	Z	V	V	" <b>kosmo-, holl</b> " : <i>bedc'hanouriezh</i> , <i>bedriezad</i> , <i>bedsezat</i> Sl. DGVB 84 ; VBEG 372 Sl. La-17 343 ; ; ; <i>bedc'henelezh</i> ; ; ; <i>bedvroad</i> ; <i>bedvezadur</i>
<b>Berr</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>eeunaat</b> " : <i>berrdaolenniñ</i> , <i>berrdresañ</i> " <b>krennañ</b> " : <i>berrzispiegañ</i> Sl. DGVB 82 ; VALL XXIX Sl. La-14 183 ; <i>berrbad</i> ; <i>berrdro</i> ; ; <i>berwel</i> ; <i>berrzastum</i> ; <i>berrvuhezek</i> ; <i>berrventek</i>
<b>Besk</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>berraet</b> " : <i>beskerv</i> , <i>beskorn</i> Sl. VALL XXIX Sl. La-11188
<b>Bev</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>a denn d'ar vuhez</b> " : <i>bevgediad</i> , <i>bevret</i> Et. " <b>bio-</b> " : <i>bevdreluc'hañ</i> , <i>bevenaosañ</i> , <i>bevgimiezh</i> , <i>bevsav</i> Sl. La-08 379 <i>bevgelc'h</i> ; ; <i>bevdolz</i> ; <i>bevc'hremmoniezh</i> ; <i>bevwrezventerezh</i> ; <i>bevezouaroniezh</i> ; <i>bevvod</i> ;

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Bihan</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"nebeut a bouez, dister" : <i>bihandra</i> Sl. DGVB 80, 82 ; VALL XXIX Sl. La-17 374, 375 ; <i>bihanbouez</i> ; <i>bihandra</i> ; ; <i>bihanwerzhañ</i> ; <i>bihandouez</i> ; <i>bihanvourc'hiz</i> ; <i>bihanvent</i>
<b>Blein</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	"e amgant ar Jedoniezh hag ar Fizik " : <i>bleinahel</i> ; <i>bleindredander</i> , <i>bleinwarellder</i> , <i>bleinreder</i> "stur, dreist" : <i>bleinskrid</i> "penn, ambilh" : <i>bleingêr</i> Sl. DGVB 85 <i>bleingêr</i> ; ; <i>bleindredander</i> ; ; <i>bleinwarellder</i> ; ;
<b>Bon</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"diazez, gwrizienn, kef" : <i>bondeskad</i> , <i>bonimbourc'h</i> , <i>bonlakadenn</i> , <i>bonreizh</i> , <i>bonvezad</i> , <i>bonventad</i> Sl. VALL XXIX ; HYZH 178 18 hh. Sl. La-03 87 ; La-06 96 ; La- 10 70 <i>bongevor</i> ; ; <i>bondalm</i> ; <i>bonc'her</i> ; <i>bonwir</i> ; <i>bondoug</i> ; <i>bonveziad</i> ; <i>bonverkañ</i>
<b>Boued</b>	K	P	T	C'H	W		V	V	<i>bouedkalvezour</i> ; ; ; ; ; <i>bouedvar</i> ; <i>bouedvirout</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Bras</b> ( <i>Braz</i> dirak ar son- ennoù)	K	P	T	C'H	W	D	V	V	" <b>hep munudaouiñ, diverrañ</b> ": <i>brastresañ, brazervad</i> " <b>grosso modo</b> " : <i>brazober, braskontañ</i> " <b>diglok</b> " " <b>a gementadoù bras</b> " : <i>brasprenañ, braswerzhañ</i> " <b>dam-</b> " : <i>braswelout, braspardiñ</i> Sl. VALL XXIX <i>braskannañ; brasprenañ; brastres;</i> <i>brasc'hopred; braswerzh; brasdiferañ;</i> <i>; brasventañ bras- + sonennoù →</i> <i>braz- : brazamzer; brazervad;</i> <i>brazimbourc'hiñ; brazober;</i>
<b>Bred</b>	K	P	T	C'H *	W		V	V	Et. " <b>psik-, psiko-</b> " : <i>bredelfennañ, bredkreudel</i> Sl. La-08 296, 330, 346 Sl. La-16 168 ; La-17 362 <i>bredklañv; bredprouata; bredtarzh;</i> <i>bredwezher; ; bredvevedel;</i> <i>bredvezekniezh</i> * <i>bred- + gen- → bredien-</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Brizh</b>	K	P	T	C'H *	W	D	V	V	<p>"<b>kamm, a-dreuz</b>" : <i>brizhkredenn, brizhkeltiegour, brizhfaoutañ, brizhistorek</i></p> <p>"<b>fals</b>" : <i>brizhelevez, brizhklozus</i></p> <p>Et. "<b>pseudo-</b>" : <i>brizhfizikel, brizhdaelerezh, brizhhentenn, brizhlenneg</i></p> <p>Sl. VALL XXIX</p> <p>Sl. La-07 94</p> <p><i>brizhkenwerzhour ; brizhpoellataerezh ; brizhtrivliadel ; brizhc'houlenn ; brizhverinek ; brizhdivezouriezh ; brizhveziad ; brizhvarc'hadour</i></p> <p>* brizh- + gouizieg- → brizhouizieg-</p>
<b>Buan</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	<p>Sl. DGVB 92 ; VALL XXX</p> <p>Sl. La-08 179 ; La-12 50, 51</p> <p>; ; <i>buandalm</i> ; ; ; ;</p>
<b>Daou</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"<b>doubl</b>" : <i>daoudroc'h, daougementiñ, daouglik</i></p> <p>"<b>e div lodenn hegement</b>" : <i>daouhanteriñ</i></p> <p><b>div wech</b>" : <i>daoublegañ</i></p> <p>Et. "<b>amphi-, amphi-</b>" : <i>daouzourdrigat</i></p> <p>Et. "<b>bi-, di-</b>" : <i>daoudroadeg, daouspin, daousti, daouvolc'han</i></p> <p>Sl. DGVB 151 ; VALL XXXI ; GEME 77</p> <p>Sl. La-10 374 ; La-17 154</p> <p><i>daougornel ; daoubarzh ; daoudu ; daouc'hourc'hwel ; daouwelout ; daouzasson ; daouvarr ; daouvetalegezh</i></p>



Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Darn</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>evit lod</b> " : <i>darnamzer, darngoll, darnurzhañ, darnved, darnziouliet</i> Sl. VALL XXXI <i>darngarzh ; darnbare ; darndaladur ; ; ; darnzisleadur ; darnveziat ;</i>
<b>Dindan</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	" <b>danded</b> : – <b>danded en egor</b> : <i>dindandouar</i> – <b>danded dre leterc'hañ</b> : <i>dindanframmad</i> Sl. VALL XXXII <i>; ; ; ; ; dindandouarenn ; ; dindanvor</i>
<b>Dister</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>nebeut a bouez</b> " : <i>disterberzh, disterbouez</i> Sl. VALL XXXII <i>distergenderc'husted ; disterbriz ; disterdra ; ; ; ;</i>
<b>Diuz</b>	K	P	T	C'H *	W		V	V	" <b>dibab</b> " : <i>diuzamred, diuzamzer, diuzhaeziñ</i> Sl. La-08 29 <i>; ; ; diuzc'halv ; diuzwezenn ; ; diuzvarnel ;</i> * diuz- + gouennañ → diuzouennañ

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Div</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>doubl</b> " : <i>divesaouennañ, divsammegenn</i> Et. " <b>amphi-</b> ; <b>bi-</b> ; <b>di-</b> " : <i>divatomennek, divelfennañ, divrannañ, divvent, divyezhek</i> Sl. VALL XXXII <i>divgambregezh ; divblezh ; divdonnell ; divc'harzh ; ; divzremmet ; divvroadelezh ; divvent</i>
<b>Don</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	" <b>doded</b> — <b>en egor</b> : <i>donvor</i> — <b>dre leterc'hañ</b> " : <i>doneraeziñ, donveiz, donvredoniezh, donyezhadurezh</i> Sl. La-07 75 ; La-16 16 <i>dongreizenn ; donbrennezat ; ; ; donzanvez ; donvro ; donvoriat</i> * don- + gen → donien
<b>Dorn</b>	G	B	D	C'H *	W		V	V	" <b>a denn d'an daouarn</b> " : <i>dornle, dornimbourc'h</i> Et. " <b>mani-</b> , <b>manu-</b> , <b>chiro-</b> " : <i>dornren, dornskrivañ</i> Sl. VALL XXXII <i>dorngest ; ; ; dornwezhañ ; ; ;</i> * dorn- + gal- → dornial-

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Douar</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>a denn d'an D(d)ouar, d'an tir</b> " : <i>douaregor, douargren</i> Et. " <b>geo-</b> " : <i>douarbolitikouriezh, douarfizik</i> <i>douargerc'h ; douarbellvan ; douardrevn ; douarc'hounezour ; douarwrez ; douarzezouger ; douarvevad ; douarventouriezh</i>
<b>Dour</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>o tennañ d'an dour</b> " : <i>dourgi, douryar, dourva</i> Et. " <b>hydro-</b> " : <i>dourdredanva, dourgoeñv, dournerzhoniezh</i> Sl. VALL XXXII <i>dourgrignerezh ; dourbont ; dourdredan ; durc'hounezerezh ; dourwaskerell ; dourzileizh ; dourvevoniezh ; dourvarc'h</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Dreist</b>	K	P	T	G	GW *	D	B	M	<p>"uheloc'h, en tu all da" : <i>dreistden, dreistniver</i></p> <p>"ouzhpenn" : <i>dreisteurvezh, dreistkarg</i></p> <p>Et. "hyper-, super- ; supra- ; ultra-" : <i>dreistadeilad, dreistreüsted, dreistherrek, dreistkizidigezh, dreistmouk</i></p> <p>Sl. VALL XXXII</p> <p><i>dreistkenderc'h ; dreistprizañ ; dreisttaos ; dreistgopr ; dreistgwir ; dreistdispign ; dreistbuzad ; dreistmagañ</i></p> <p>Notenn. Gwell eo freuzañ ar stummoù kemmet enno * GW/W war-lerc'h <i>dreist</i> :</p> <p>* <i>dreistweladek, * dreistwerzhañ, * dreistwir, * dreistwisk, h.a.</i></p>
<b>Drouk</b>	K	P	T	C'H	W	Z	V	V	<p>"fall" : <i>droukc'hoant, droukkomz, droukskouer</i></p> <p>Sl. VBEG 378 ; VALL XXXII</p> <p><i>droukkemederezh ; droukpleg ; drouktunerezh ; drouc'hraer ; droukwiskañ ; droukziviañ ; droukverzh ; droukvallozh</i></p> <p>drouk- + sonennoù → droug- :</p> <p><i>drougarver ; drougemellout ; drougintent ; drougober ;</i></p>
<b>Eeun</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	<p>"regek" : <i>eeunregenn</i></p> <p>"perzh dihanterat" : <i>eeunarselladus</i></p> <p>Sl. La-04 28</p> <p><i>eeungranell ; ; ; eeunwelout ; ;</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Eil</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p>"<b>daouvet</b>" : <i>eilezel</i></p> <p>"<b>adarre</b>" : <i>eillec'hiañ, eilmoulañ, eilskrivañ</i></p> <p>"<b>evit an eil gwech</b>" : <i>eilskeudenniñ, eildimeziñ</i></p> <p>"<b>tu evit tu</b>" : <i>eilpennañ</i></p> <p>"<b>isrenk</b>" : <i>eilhent, eilmestr, eilprefed, eilprezeg</i></p> <p>"<b>skoriad</b>" : <i>eilkelenner, eilskolaer</i></p> <p>Et. "<b>contr-</b>" : <i>eiltu</i></p> <p>Sl. DGVB 155 ; VALL XXXIII</p> <p>Sl. La-06 96 ; La-07 18</p> <p><i>eilkevrañ ; eilpennvan ; eiltaoliñ ; eilgreadenn ; eilgwered ; eildorn ; eilbarner ; eilmerk</i></p>
<b>En</b>	K *	P	T	G	GW	D	B	M	<p>"<b>e-barzh</b>" : <i>enkefiañ, enlakaat, enmoulañ</i></p> <p>Et. "<b>endo-</b>" : <i>endelviñ, engweliñ</i></p> <p>Et. "<b>intra-</b>" : <i>enkrozhevzh ; enien ; enlavarel</i></p> <p>Sl. DGVB 159, 220 ; VBEG 382 ; VALL XXXIII</p> <p>Sl. La-11 81</p> <p><i>enklozañ ; enpun ; entiañ ; engronnañ ; engwezhañ ; endodiñ ; enbac'hadur ; enmont</i></p> <p>* <i>nemet engehentañ</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Enep</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p><b>"kontrol"</b> : <i>enepdroug, enepnatur, enepster</i>, Et. <b>"anti-"</b> : <i>enepkankr, enepmilour</i></p> <p>SI. DGVB 160 ; VALL XXXIII La-12 289</p> <p><i>enepkloer ; enepouez ; eneptank ; enepgall ; enepgwerinek ; enepdivezek ; enepbonreizh ; enepmonc'hwezh</i></p> <p>enep- + a-, e-, i-, o-, u- → eneb- : <i>enebalaman ; enebemsavel ; enebistorel ; enebode ; enebuswask</i> (hogen <i>enepyec'hed, enepyoc'hek, enepyuzev</i>)</p>
<b>Etre</b>	K	P	T	G	W	D	V *	M	<p><b>"darempred"</b> : <i>etreweladenniñ, etrelazhidigezh</i></p> <p>Et. <b>"inter"</b> : <i>etrekeltiek, etrelinenn, etresterel</i></p> <p>SI. VALL XXXIII</p> <p><i>etrekempouezañ ; etrepaouezañ ; etretrovanel ; etregennadel ; etrewerediñ ; etrederc'hel ; etrebrezel ; etremerk</i></p> <p>* nemet <i>etrevroadel</i> ha <i>deveradoù</i> (GIBR 773)</p>
<b>Fall</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	<p><b>"divat, gwall, drouk "</b> : <i>fallamzer, fallober, fallwiskañ</i></p> <p>SI. VALL XXXIII</p> <p><i>fallgaloniñ ; ; ; fallwerzhañ ; ; fallvrudañ ; fallvuntrañ</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Fals</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	"e gaou, faos" : <i>falschekenn, falskredenn, falstouiñ, falswelidigezh</i> Sl. VALL XXXIII <i>falskudenn ; ; falstest ; ; falswerelezh ; falsdaelerezh ; falsvroadel ; falsvoneizañ</i>
<b>Frank</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	"dieub, dizalc'h" : <i>frankamred, frankembregañ, frankeskemm, frankveizour, frankvennout</i> <i>frankkevezañ ; ; ; ; frankdimez ; ; frankvicher</i>
<b>Gaou</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	"fals" : <i>gaoufeizañ, gaounadiñ, gaouvildiou</i> Et. "pseudo-" : <i>gaoudreol, gaousturiadell</i> Sl. DGVB 179 <i>; ; gaoudrovezh ; ; ; gaouzitour, gaouzargouezhek ; gaouvoneg, gaouvar ; gaouvildiou</i>
<b>Gin</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"kontrol " : <i>ginaelañ, gindreu</i> Et. "anti-" : <i>gingerc'hell, ginre gingresk ; ginbennañ ; gindu ; ; ginwifrellet ; ginderc'had ; ginvrizh ;</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Goude</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p><b>"warlerc'hded :</b></p> <p>– <b>en egor :</b> <i>goudekangrenn, goudeskrid</i></p> <p>– <b>en amzer" :</b> <i>goudebrezel</i></p> <p>Et. <b>"post-"</b> : <i>goudearnevez, goudedeiziañ, goudeskol, goudefreudel, goudesurjaniel</i></p> <p>Sl. La-09 327</p> <p><i>goudekensonnennel ; ; ;</i></p> <p><i>goudegreantel ; goudegwerzh ;</i></p> <p><i>goudedispac'h ; goudebroadel ;</i></p> <p><i>goudemarksour</i></p>
<b>Gwall</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p><b>"fall, drouk" :</b> <i>gwallamzer, gwallbleg, gwalldaol, gwallverzh, gwallvor, gwallziskred</i></p> <p>Sl. VALL XXXIV</p> <p>Sl. La-09 354</p> <p><i>gwallgas ; gwallblanedenn ; gwalldech ;</i></p> <p><i>gwallc'hraet ; gwallwir ; gwallzarvoud ;</i></p> <p><i>gwallvrudañ ; gwallveskañ</i></p>
<b>Gwar</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	<p><b>"distressed, ezreolded" :</b> <i>gwarabeg</i></p> <p>Sl. La-15 238 hh.</p> <p><i>gwargerzh ; gwarbleg ; gwardreustell ; ; ;</i></p> <p><i>gwarveiz</i></p>



Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Gwenn</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	"a liv gant an erc'h" : <i>gwenngellig, gwennroc'heneg, gwennrazañ</i> "eürusted" : <i>gwenvidikaat, gwennvoudig</i> Sl. VALL XXXIV <i>gwenngenn ; gwennboblet ; gwennndregenk ; gwennc'hloanek ; ; ; gwennvoudig ;</i>
<b>Gwir</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	"reizh, gwirion, diles" : <i>gwirabeg, gwirgelenn, gwirheñvel, gwirvoud</i> Sl. DGVB 192 ; VALL XXXIV Sl. La-11 187 <i>gwirgelenn ; ; ; ; ; gwirvoziad ;</i>
<b>Hanter</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	Et. "demi- ; hemi- ; mi-" : <i>hanterdreñ, hanterhoali, hantergelc'h, hanterhent</i> Sl. DGVB 207, 209 ; VALL XXXIV <i>hantergroaz ; hanterbriz ; hanterdinell ; hanterc'hopr ; hanterwerzenn ; hanterzouar ; hantervoull ;</i> * hanter- + gouizieg → <i>hanterouizieg</i>
<b>Hen</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	"kozh" : <i>Henamzer, hendra</i> Et. "archo-" : <i>henoniour, henstuzel</i> Et. "paleo-" : <i>henloenoniezh</i> Sl. DGVB 208 ; VALL XXXIV <i>hengoun ; henbobl ; hendraour ; henc'halleg ; henwengel ; henzanevellour ; henvoaziañ ; henvojenn</i> * hen- + gouez → <i>henouez</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Heñvel</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	Et. " <b>homo-</b> " : <i>heñvelreviad, heñvelson, heñvelskriv, heñvelstalañ</i> Sl. DGVB 208 <i>heñvelgazout ; ; ; ; heñveldelviñ ; ;</i>
<b>Hep</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>diouer</b> " : <i>hepkoun, hepkreizet, hepster</i> " <b>hebiou</b> " : <i>hepkoriñ, heptreugañ, heptuañ</i> Sl. DGVB 209 ; VBEG 380 <i>hepkaelañ ; ; heptreugañ ; ; ;</i> <i>hepdodiñ ; ; hepmuiket</i>
<b>Hir</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>astenn bras</b> : – <b>en amzer</b> : <i>hirvezañs, hirzerc'hel</i> – <b>en egor</b> : <i>hirlastr, hirstihed, hirvel</i> Et. " <b>doliko-</b> " : <i>hirbennek</i> Sl. DGVB 212 ; VALL XXXV <i>hirgamm ; hirbad ; hirdreizher ;</i> <i>hirc'houzoug ; hirwel ; hirzarnodiñ ;</i> <i>hirvoaz ; hirvel</i>
<b>Holl</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	Et. " <b>omni-</b> " : <i>hollouiziek, hollvezant, hollzebrer</i> Et. " <b>pan-</b> " : <i>hollgelt</i> Sl. DGVB 213 ; VALL XXXV Sl. La-17 46, 47 <i>hollgarantez ; hollbredenek ;</i> <i>holldrevadennel-ouriezh ; hollc'halloud ;</i> <i>hollwaskellouriezh ; hollzebrer ; hollveli ;</i> <i>hollvadelezh</i> * holl- + gouiziek → <i>hollouiziek</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Hont</b>	K	P	T	G *	W	D	V	V	<p>"trehontelezh : en tu all (e-keñver anaout)" : <i>hontwriennadur</i>  Et. "extra-" : <i>hontlavar, hontyezh</i>  Et. "meta-" : <i>hontved</i>  Et. "supra-" : <i>hontistor</i>  Et. "ultra-" : <i>hontlavar, hontyezh</i>  Sl. DGVB 214 ; EMSA, 124 14  Sl. La-03 88 ; La-08 329 ; La-15 23  <i>hontkenderc'hañ ; ; ; hontger ; hontwerzhad ; hontdodiñ ; hontved ; hontvent</i>  * hont- + gouez → <i>hontouez</i></p>
<b>Izel</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	<p>"a-is ul live savelet " : <i>izelbriz, izeldalm</i>  Sl. DGVB 232  ; <i>izelberzh ; izeldizh ; izelc'hopr ; izelwask ; izeldourvezh ; izelvarr ; izelvor</i></p>
<b>Kamm</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"a-dreuz" : <i>kammdro, kammregenek</i>  "fall" : <i>kammdroc'h, kammglerennad, kammwared</i>  "sius" : <i>kammneuziad</i>  "an dreuzded  — en amzer : <i>kammamzeriañ</i>  — en egor : <i>kammrod</i>  — dre leterc'hañ" : <i>kammenglev</i>  Et. "para-" : <i>kammeraez, kamamboell, kammgomz</i>  Sl. DGVB 94, 95 ; VALL XXX  Sl. La-15 220  <i>kammgerner ; kammbleg ; kammdro ; kammc'heriañ ; kammwared ; kammzerc'hañ ; kammvoaziañ ; kammveizañ</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Keit</b> ( <i>Keid</i> dirak ar sonen- noù)	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"kevatalded" : keitrannañ          – en amzer : keitpred          – en egor " : keitgarek, keitskar, keitvent          Et. "iso-" : keitglavenn, keitwaskenn, keitwrezenn          Sl. DGVB 100 ; VBEG 282 ; VALL 402 ; HYZH 178 43 hh.          Sl. La-08 68 ; La-10 316          keitkenderc'h ; keitpell ; keittuek ; keitgavael ; keitwaskeg ; keitdoues ; keitvarr ; keitvent keit- + sonennoù → keid- : keidankorvez ; keidesaouek keit- + -(h)a- → keita-</p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ken (kenedus)</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>kaer, kenedus</b> " : <i>kenlagad</i> Sl. DGVB 94, 106 ; VBEG 373 ; VALL XXX Sl. La-17 342 <i>kenmegiñ</i>
<b>Ken</b>	G	B	D	G *	W	D	V	V	" <b>strollennel</b> " : <i>kenvevañ</i> " <b>heñvel</b> " : <i>kendarzh, kenoad</i> " <b>boutin</b> " : <i>kenvarc'had, kenved, kenyezh</i> " <b>keveskemmded</b> " : <i>kendispell, kenetrewezhiañ</i> Et. " <b>co-</b> " : <i>kennotañ, kenvezañ, kenwadel</i> Et. " <b>homo-</b> " : <i>kenliv</i> Et. " <b>inter-</b> " : <i>kenbrezegeer</i> Sl. DGVB 111, 114 ; VBEG 374, hh. ; VALL XXX ; Da-63 18 Sl. La-09 156 ; La-10 74 ; La-14 184 ; La-17 282, 381 <i>kengreizañ ; kenbiaouañ ; kendonkad, kendreluc'hañ ; kenglenel ; kenweañ ; kendeç'heriañ ; kenvevenn ; kenvad, kenvegiñ</i> * ken- + gnaou- → <i>kennaou-</i> * ken- + gouennad → <i>kenouennad</i> ken- dirak l- → kenl- : <i>kenlakaat, kenlec'hiañ</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Kent</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	<p>"a-raok" : <i>kentamzer, kentvrezhoneg</i>  "deuet da gentañ" : <i>kentarouez, kentward</i>  Et. "ante-" : <i>kentanaezioù, kentorad, kenttermen</i>  Et. "pre-" : <i>kentanv, kentskrid</i>  Et. "proto-" : <i>kentamparañ, kentistor, kentpatrom</i>  Sl. DGVB 102 ; VBEG 373  Sl. La-06 96  <i>kentkemenn ; kentprenañ ; kenttonket ; kentgounezet ; kentwezher ; kentdeskadur ; kenvezout ; kentvennozh</i></p>
<b>Kenta</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<p>"a-raok" : <i>kentaskrivañ</i>  "kentidik" : <i>kentavalleeg</i>  Et. "primo-" : <i>kentagened</i>  Et. "proto-" : <i>kentahoalad</i>  Sl. La-17 52, 53  ; ; ; <i>kentagenel ; ; kentadorn ; kentabec'h ;</i></p>
<b>Kevan</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	<p>"klok" : <i>kevandir, kevansell</i>  Sl. La-09 96  <i>kevangant ; ; kevandrevnañ ; ; ; kevandodiñ ; kevanved ; kevanveizek</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Kil</b>	G	B *	D	C'H	W	D	V	V	" <b>a-dreñv, war-dreñv</b> " : <i>kildant, kilselliñ</i> " <b>a-gein</b> " : <i>kildorn,</i> " <b>war-giz</b> " : <i>kildreu, kilreder</i> Et. " <b>retro-</b> " : <i>killevezon, kilwerediñ</i> SI. DGVB 105, 106 ; VALL XXX SI. La-05 62 <i>kilgosteziñ ; kilbunañ ; kildalvoud ; kilc'hread ; kilweañ ; kildurc'haet ; kilvac'h ;</i> * nemet <i>kilpenn</i>
<b>Korn</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>kogn, a-gogn</b> " : <i>korndalm, kornsellout, kornbleg</i> SI. VALL XXXI ; <i>kornbegañ ; korndizh ; ; ;</i> <i>kornzigeriñ ; ; kornventer</i>
<b>Korr</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>bihanded</b> " : <i>korrikan, korrvronkez</i> Et. " <b>micro-</b> " : <i>korrfizik, korrgresker</i> SI. DGVB 119 ; VALL XXXI ; HYZH 178 46, 47 <i>korrgewerier ; korrbellenn ; ;</i> <i>korrc'houleviñ ; korrwagenn ; korritzour ; korrvred ;</i>
<b>Kozh</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	" <b>dispriz</b> " : <i>kozhtra, kozhwrac'h</i> SI. DVBR 423 ; VALL XXXI <i>kozhkailhiñ ; ; kozhtra ; ; kozhwrac'h ; kozhdimezet ; ; kozhvirout</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Krak</b>	K	P	T	G *	W	D	V	V	" <b>bihanaat</b> " : <i>krakfalc'hun, ktakhouad</i> " <b>disprizus</b> " : <i>krakaotrou, ktakvrezhoneg, krakvuhez</i> SI. VALL XXXI ; <i>krakperoked</i> ; ; ; <i>krakdevodez</i> ; <i>krakvastard</i> ; <i>krakvezv</i> * <i>krak-</i> + <i>gouiziad</i> → <i>krakouiziad</i>
<b>Kreiz</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	" <b>kreizidigezh</b> — <b>en amzer</b> : <i>kreizendervez, kreiznoz</i> — <b>en egor</b> : <i>kreizkêr, kreiztuenn</i> — <b>dre leterc'hañ</b> " : <i>kreizkleizad</i> <i>kreizkorn</i> ; <i>kreizparzh</i> ; <i>kreiztec'h</i> ; ; <i>kreizweredus</i> ; <i>kreizdouarat</i> ; ; ;
<b>Krenn</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	" <b>berr</b> " : <i>krennbaotr, krennvazh</i> " <b>etre</b> " : <i>Krennamzer, krennhedtaol, krennskeul</i> " <b>kurzh</b> " : <i>krennlavar</i> Et. " <b>brachy-</b> ", Br. " <b>braki-</b> " : <i>krennbennek</i> SI. DGVB 122 ; VALL XXXI SI. La-16 281, 282 <i>krenngembraeg</i> ; <i>krennbad</i> ; <i>krenndalm</i> ; <i>krennc'her</i> ; <i>krennwez</i> ; <i>krennden</i> ; <i>krennvegek</i> ; <i>krennvenez</i>
<b>Kroaz</b>	K	P	T	C'H	W		V	V	" <b>a-groaz, e kroaz</b> " : <i>kroazhent, kroazlin, kroazost, kroazstagañ</i> SI. DGVB 123 ; VALL XXXI <i>kroazkredadiñ</i> ; <i>kroazpenn</i> ; ; ; <i>kroazwareg</i> ; ; ; <i>kroazvaen</i>



Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Led</b>	K	P	*	C'H	W	D/T **	V	V	<p><b>"war un tu hepken"</b> : <i>ledenez, ledsoliadel, ledvab, ledverb</i>  Et. <b>"demi-"</b> : <i>ledplaenenn, ledsammer</i>  Et. <b>"hemi-"</b> : <i>ledkorf, ledost, ledseizi</i>  Et. <b>"pseudo-"</b> : <i>ledistor, ledeskeuliadell</i>  Et. <b>"semi-"</b> : <i>ledfrankiz, ledlinennek</i>  Sl. DGVB 241; VBEG 382 ; VALL XXXV  Sl. La-10 199  <i>ledkenvell ; ledpenn ; ; ledwered ; leddigor, leterc'hañ ; ledvlein ; ledvicheriad</i>  led- + heñvel → <i>leteñvel</i>  * led- + t → let- : <i>leti ; letu</i>  ** led- + d- → ledd- : <i>leddedaol ; leddigor ; leddivblezh</i>  ** led- + d- → let- : <i>leterc'hañ ; letodiñ</i></p>
<b>Leun</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	<p><b>"klok"</b> : <i>leunberzh, leundivblezh, leunster ; leunbrizh ; ; leunc'halloud ; leunwir ; leundivblezh ; ; leunvent</i></p>
<b>Lez (kostez)</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	<p><b>"kostez"</b> : <i>lezgerienn, lezwered</i>  Et. <b>"para-"</b> : <i>lezahelel, lezalvezel, lezdlidek, lezkell, lezlavar, lezvredel, lezfizikel</i>  Sl. DGVB 241  Sl. La-12 289 ; La-17 207  <i>lezkrozh ; ; leztredanegezh ; lezgerienn ; lezwent ; lezdlidek ; lezvredel ; lezvezegel</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Lies	K	P	T	G	GW *	D	B **	M	" <b>meur a</b> " : <i>liesdoare, liesgeriañ</i> Et. " <b>poly-</b> " : <i>liesdouead, liesozac'h, lieswreg</i> Et. " <b>multi-</b> " : <i>liesgwiskad, lieshaenek, lieslivañ</i> Sl. DGVB 243 ; VALL XXXV Sl. La-17 90 <i>lieskemeradezh ; liesparzh ; liestennañ ; liesgouleviñ ; liesgwiskad ; liesdiskiblezh ; liesbannañ ; liesmod</i> * nemet <i>lieswreg</i> ** nemet <i>liesver ; liesvroadel</i>
Luc'h	G*	B*	D*	G	W		V	V	" <b>gouloù , sked</b> " : <i>luc'haozañ</i> Et. " <b>photo-</b> " : <i>luc'hengravañ, luc'hgelc'h, luc'hskeudenniñ</i> Sl. La-09 42 ; La-17 17, 318, 380 <i>luc'hgas ; luc'hbompañ ; luc'hdredan ; ; luc'hwezañ ; ; luc'hverk ; luc'hvannañ</i> * neuennadennoù a gaver a-z kemmadurioù K, P, T, war-lerc'h <i>luc'h-</i> . Kinniget e vez hiviziken da nevezc'heriañ dre K/G, P/B, T/D (sl. La-17 17, 380) ken ma seller betek gouzout evel nemeddennoù <i>luc'hkehentiñ, luc'htorr, luc'htredan</i>
Mamm	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>pennañ</b> " : <i>mammiliz</i> Et. " <b>matri-</b> " : <i>mammveliezh</i> Sl. VALL XXXV La-11 139, 140 <i>mammgêr ; ; ; ; ; mammvenveg ; mammvoul</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Marv</b>	G	B	D	C'H	W		V	V *	<i>marvamzer, marvleueañ, marvleuñv</i> <i>marvgospañ ; marvbouezañ ; ; ; ; ;</i> <i>marvor</i> * marv- + mor → <i>marvor</i>
<b>Meur</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<b>"bras"</b> : <i>meurhent, meurlestr, meurvil</i> <b>"skedus"</b> : <i>meurlidañ</i> Et. <b>"macro-"</b> : <i>meurfizik, meurgantel, meurselladel</i> SI. DGVB 259 ; VBEG 400 ; VALL XXXV SI. La-06 79 <i>meurguntellañ ; ; meurdi ;</i> <i>meurc'houleverezh ; ; meurzitour ;</i> <i>meurvreadezh ; meurvor</i>
<b>Mor</b>	G	B	D	C'H	W	Z *	V	V	SI. DGVB 259 ; VBEG 368, 398 ; VALL XXXVI <i>morgurañ ; morbreizher ; mordreizher ;</i> <i>morc'hlav ; morwreg ; morzen ;</i> <i>morvaouder, morveveg ; morvichereg</i> * nemet <i>mordezouger</i>
<b>Nann</b>	K	P	T	G	GW	D	B	M	<i>nannboud, nannriezel</i> SI. VALL XXXVI SI. La-10 59, 60 <i>nannkomunour ; nannperzhiad ; ;</i> <i>nanngall ; ; nanndoue ; nannbureviour ;</i> <i>nannmarksour</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Nemeur</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	Et. " <b>oligo-</b> " : <i>nemurnevieder</i> , <i>nemursaviad</i> ; <i>nemurbrenouriezh</i> ; ; ; <i>nemurwerzhouriezh</i> ; ; <i>nemurveliezh</i> ;
<b>Nep</b> ( <i>Neb</i> dirak ar son- ennoù)	K	P *	T	G	GW	D	B	M	" <b>forzh pe</b> " : <i>nebergeñver</i> Et. " <b>omni-, iso-</b> " : <i>neproudek</i> , <i>nebahelek</i> Et. " <b>ulli-</b> " : <i>nebarvezat</i> , <i>nebamzer</i> , <i>nepgour</i> Sl. La-13 257 ; La-17 358, 359 <i>nepkredenn</i> ; <i>neppoell</i> ; <i>neptuiñ</i> ; <i>nepgour</i> ; ; <i>nepdurc'hadur</i> ; <i>nepbec'h</i> ; nep + sonennoù → neb : <i>nebahel</i> ; <i>nebegezh</i> ; <i>nebiñ</i> * nep- + par(ek) → <i>nepar(ek)</i> * nep- + pezh → <i>nepezh</i>
<b>Nes</b>	K	P	T		W *	D	V	V	" <b>tost</b> — <b>en amzer</b> — <b>en egor</b> : <i>nesheolvan</i> , <i>neskorfel</i> — <b>dre leteterc'hañ</b> " : <i>nesamkan</i> , <i>neskar</i> , <i>nesster</i> Sl. DGVB 266 ; VALL XXXVI Sl. La-15 93 <i>neskelc'h</i> ; <i>nesparzhel</i> ; <i>nestud</i> ; ; ; <i>nesdouarvan</i> ; ; <i>nesvaez</i> * <i>nesgwalez</i> : en degouezh-mañ ne arc'hwel ket <i>nes</i> evel ur rakger eildorn met evel ur rakrann : avel <i>nes</i> he nerzh da hini ur <i>gwalez</i> ha n'eo ket ur <i>gwalez</i> a ve <i>nes</i> d'udb ; ur c'henstrollad eo <i>nesgwalez</i> ha neket ur rakgeriad.

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
Nevez	K	P	T	C'H	GW	D	V	V	<p>"kentaou" : <i>nevezdeued, nevezvondian</i>  Et. "neo-" : <i>nevezkeltiek, nevezplatonat, nevezsoliadelour, nevezwe</i>  Sl. DGVB 161, 266 ; VBEG 27 ; VALL XXXVI  <i>nevezkevalaour ; nevezpaganiezh ; neveztrevadenner ; nevezc'heriañ ; nevezwe ; nevezdeued ; nevezvrezhonekaat ; nevezvedañ</i></p>
Pell	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	<p>"pellder" :  — en amzer : <i>pellamzer</i>  — en egor : <i>pellgomz, pellvro</i>  — dre leterc'hañ" : <i>pellgar</i>  Et. "tele-" : <i>pellgehentiñ, pellreoliñ, pellsanterezh</i>  Sl. DGVB 282, 283 ; VALL XXXVI  Sl. La-17 208, 209  <i>pellgeweriañ ; pellbrenañ ; pelldrezalc'h ; ; pellweliñ ; pellzinoiñ ; pellvleniañ ; pellvoulerez</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Penn</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	<p><b>"pouezder"</b> :</p> <p>— <b>a renk uhelañ</b> (tud) : <i>penngadour, penlevier, pennreizher, pennvrezelour</i></p> <p>— <b>a bouez brasañ</b> (traoù) : <i>penngêr, pennlavarenn, pennreolenn, pennstur, pennvon</i></p> <p><b>"gourfenn"</b> : <i>pennahel, Sl. DGVB 283, 284 ; VALL XXXVI Sl. La-13 19, 20 ; La-16 353 ; La-17 319 penngêr ; pennbarzh ; penndeñzorier ; pennc'her ; pennnwele ; penndamant ; pennvarner ; pennvezeg</i></p> <p>Notenn : pa vez <i>penn</i> rakrann ha neket rakger, ne c'hoarvez ket ar c'hemmadur : <i>pennkêr ; pennti pennmoalañ, h.a.</i> (sl. an notenn a-z. Nes)</p>
<b>Rak (Rag dirak son- ennoù)</b>	K *	P	T	G	W	D	V	V	<p><b>"a-raok"</b> : <i>rakprenañ, raksoñj, rageost, rakwel</i></p> <p>Et. <b>"ante-"</b> : <i>ragardaoladel, rakplegañ</i></p> <p>Et. <b>"pre-"</b> : <i>raganaoudegezh, ragevezh, ragistor</i></p> <p>Sl. DGVB 292 ; VBEG 383 ; VALL XXXVII</p> <p><i>rakkambr ; rakprenañ ; raktres ; rakger ; rakwelout ; rakdiuz ; rakvarn ; rakveno</i></p> <p>* rak- + kuit → <i>rakuit</i></p> <p>rak- + sonennoù → rag- : <i>raganv ; rageeun ; ragistor ; ragoberiad ; ragurzhiadiñ</i></p>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Rann</b>	G	B	D	C'H *	W	D	V	V	" <b>lod</b> " : <i>ranngêr, rannvro, rannc'her</i> Sl. DGVB 293 ; VBEG 391, 392 ; VALL XXXVII Sl. La-11 153 ; La-17 317 <i>ranngêr ; rannbennad ; rann di ; rannc'hopr ; rannwask ; rann douar ; rannvloaziat ; rannvor</i> * rann- + gouiz- → <i>rannouiz-</i>
<b>Re</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	" <b>dreist penn ; reñver</b> " : <i>rec'hoantegezh, refiziañs, reher, revec'h</i> Sl. DGVB 291, 292, 294, 297 ; VBEG 383, 384 ; VALL XXXVII <i>regarg ; rebrizañ ; redizh ; rec'halloud ; rewered ; rezrougiezh ; revarr ; revuzul</i> * re- + gouiz- → <i>reouiz-</i>
<b>Reizh</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	" <b>eeun , gwirion</b> " : <i>reizhskrivadur, reizhkredenn, reizhvarn</i> Et. " <b>ortho-</b> " : <i>reizhkelenn, reizhrolel, reizhvriad</i> Sl. VBEG 60, 61, 400 ; VALL XXXVII <i>reizhkorn ; reizhpoell ; reizhtaol ; ; reizhwir ; reizhderen ; reizhvarn ; reizhveizañ</i>
<b>Reol</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>reizh ; diouzh ar c'heidad</b> " : <i>reolvred</i> Sl. DGVB 295 Sl. La-09 433, 434 ; La-16 210 <i>reolgelc'h ; ; ; ; ; reolvred ; reolvirer</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Ret</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	"rekis" : <i>retfeur, retniver</i> Sl. DGVB 295 <i>retvez</i>
<b>Rez</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	"dieub, dizalc'h" : <i>rezvevat, rezvrientiñ</i> "arstalek" : <i>rezfeuriañ</i> Et. "homeo-" : <i>rezdelviñ, rezwrezek</i> Sl. La-09 123 ; La-10 324 ; ; ; ; <i>rezwrezek ; rezdalc'h ; rezvrientiñ ;</i>
<b>Sav</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"lec'hiañ, lakaat" : <i>savlec'hiañ</i> Sl. DGVB 301 <i>savgreiz ; savboent ; ; ; ; savdorn, savdres ; ; savverk ;</i>
<b>Serzh</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	"ortho-" : <i>serzhtreuzveg</i> Sl. La-04 28 ; ; <i>serzhtreuzveg ; ; ; ; serzhvannañ ;</i>
<b>Skin</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	"a denn d'ar bannoù, d'ar gwagennoù" : <i>skinfor</i> Et. "radio-" : <i>kingas, skingeliñ, skinwerañ</i> Et. "tele-" : <i>skinwel</i> Sl. La-09 42, hh. <i>kingurañ ; skinbellgomz ; skindredan ; ; skinwezañ ; skindeznaouiñ ; skinvevoniezh ; skinvammenn</i>



Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Skorn</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	Et. " <b>cryo-</b> " : <i>skorngar, skornverkerezh</i> Sl. La-10 95, hh. <i>skorngrignañ ; skornbrioniezh ; skorndi ;</i> <i>; skornwisk ; skorndevec'hiañ ; ;</i> <i>skornvirout</i>
<b>Skrid</b>	K	P	T	C'H	W		V	V	" <b>daveiñ d'ar skrivañ, derc'hennañ dre skrivañ</b> " Et. " <b>graph-</b> " : <i>skridaozañ</i> Sl. La-09 128, hh. ; La-16 281 <i>; ; ; ; ; skridvarnour ;</i>
<b>Sol</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>diabez</b> " : <i>solvaen, solvon</i> Sl. DGVB 306, 307 Sl. La-03 87 ; La-06 96 <i>; solboell ; ; ; solwez ; ; solvoud ;</i> <i>solvez</i>
<b>Spis</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	" <b>resis</b> " : <i>spislec'hiañ</i> Sl. VALL XXXVII <i>spiskediel ; ; ; spisc'heriañ ;</i> <i>spiswelout ; spisdremmañ ; ; spisverkañ</i>
<b>Sti</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>sonn</b> " : <i>stirann</i> Sl. La-07 12 ; La-08 184 ; La-17 281 <i>; ; ; stic'horreenn ; stiwintañ ; ;</i> <i>stivarr ;</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Stur</b>	G	B	D	C'H	W		V	V	" <b>erverkañ</b> " : <i>sturarmezh, sturlevr, sturreolenn</i> Sl. La-09 437 ; ; ; ; ; <i>sturvod ; sturvennoz</i>
<b>Teir</b>	C'H	F	Z	G	GW	D	B	M	<i>teirc'hevrennek, teirannañ, teirurzhek</i> <i>teirc'hambrelour ; ; ; ; teirgwern ;</i> <i>teirdremmek ; ; teirment, teirmillva</i>
<b>Tir</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	" <b>douar (enebet ouzh ar mor)</b> " : <i>tireoul, tirlu</i> <i>tirgehent ; ; tirdreizhid ;</i> <i>tirc'hounezhel ; tirwrez ; tirdezougen ;</i> <i>tirvloskell ;</i>
<b>Tre</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	" <b>dreist, en tu all da</b> " : <i>trebarzhiñ, trevariañ, trewaner</i> " <b>eskemm</b> " : <i>treverbañ</i> Sl. DGVB 318 ; VBEG. 297, 384, 385 ; VALL XXXVIII Sl. La-13 40 <i>tregerzhañ ; trebadout ; tredizhañ ;</i> <i>trec'haoliñ ; trewerc'hañ ; trezerc'hel ;</i> <i>trevonnañ ; trevouehiad</i> * tre- + gouez- → treouez-

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Treuz</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	" <b>direizh, fall, e gaou</b> " : <i>treuzintent, treuzkredenn, treuzlevezon, treuzsteriet</i> <b>"eskemm ; eus ul lec'h d'egile</b> — <b>en egor</b> : <i>treuzlestrañ, treuzplantañ</i> — <b>dre leterc'hañ</b> " : <i>treuzyezhañ</i> Et. " <b>trans-</b> " : <i>treuzalpat, treuzatlantel, treuzhilel</i> Sl. DGVB 324 ; VBEG 297 ; VALL XXXVIII Sl. La-13 40 <i>treuzkas ; treuzplantañ ; treuztaoliñ ; treuzgread ; treuzwelus ; treuzdoug ; treuzvegenn ; treuzvarc'had</i>
<b>Tri</b>	C'H	F	Z	G	GW	D	B	M	Sl. La-10 374 <i>tric'horn ; trifarzh ; trizueg ; trigevell ; trigwerzhouriezh ; tridevezhiat ; tribarr ; trimiziad</i>
<b>Tro</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>tro-dro da</b> " : <i>trosell, trolinenn</i> Et. " <b>circum-</b> " : <i>trogelc'h</i> Et. " <b>peri-</b> " : <i>troc'hanedel, trosellerez</i> Sl. DGVB 321 ; VALL XXXVIII <i>trogelc'h ; trobarzh ; trodroc'h ; troc'hanedel ; trowent ; ; trovleziat ; trovesk</i>
<b>Troz</b>	K	P	T	C'H	W	D	V	V	" <b>tremen a-dreuz</b> " : <i>trozhentiñ, trozhontiñ</i> <b>"dreist"</b> : <i>trozpenn</i> Sl. DGVB 322, 323 Sl. La-12 286 <i>trozkelañ ; trozpenn ; ; ; trozwazañ ; ; trozveziadur ; trozverzhout</i>

Rakger eildorn	K	P	T	G	GW	D	B	M	Durc'hadurioù ster, daveoù, skouerioù, evezhiadennoù
<b>Trumm</b>	G	B	D	C'H	W	Z	V	V	" <b>prim, buan</b> " : <i>trummgemm</i> " <b>difrae</b> " : <i>trummsurjianerezh</i> Sl. DGVB 322 Sl. La-09 332 <i>trummgêr</i> ; ; ; ; <i>trummwezhiañ</i> ; ; ;
<b>Uhel</b>	G	B	D	C'H *	W	Z	V	V	" <b>braded, laez</b> " : <i>uhelvor, uhelwad</i> Sl. DGVB 326 ; VALL XXXVIII <i>uhelgomzer ; uhelberzh ; upheldizh ; uhelc'hremm ; uhelwask ; uhekezerezh, uhelzespisadur ; uhelvec'h ; uhelvennad</i> * uhel- + gouenn → <i>uhelouenn</i>
<b>Un</b>	K	P	T	G	W	D	V	V	" <b>unel</b> " : <i>unneuz, unpreder, unvab</i> " <b>heñvel, an un</b> " : <i>untarzh</i> " <b>uni-</b> " : <i>unvlein</i> Et. " <b>mono-</b> " : <i>unsilabenn, unpenn, unyezher</i> Sl. DGVB 327, 328 ; VBEG 259, 385 ; VALL XXXVIII <i>unkejad ; unpezh ; untu ; ungenezh ; unwiskad ; undalc'h ; unveziad ; unvent</i>
<b>Unan</b>	G	B	D	C'H	W	D	V	V	" <b>o verkañ an hinienn he unan</b> " : <i>unanimboud</i> Et. " <b>auto-</b> " : <i>unandelviñ, unanstiañ, unanveveziñ</i> Et. " <b>mono-</b> (kreñvoc'h eget un-) : <i>unanwreg ; unangomz</i> Sl. DGVB. 327 ; VALL XXXVIII Sl. La-09 127 ; La-13 70 ; La-15 367 <i>unangenderc'hañ ; unanborzher ; unandarzh ; unanc'houleviñ ; ; unandihaez ; unanveveziñ ;</i>

## NOTENNOÙ LIESSEURT

lespos, posles in VALL 194 ; morzen (GIBR) ha den a vor

### DAFAROÙ HAG ARNODOÙ

Petra intent dre an termen *rakger* ?

Pell diouzhin ar soutilderioù degaset gant ar yezhadurourion a lak kemm etre "rakgerioù gwirion" (F. KERVELLA in YBRB 458 ; GOULVEN PENNAOD in *Ar Stourmer* 15-16, p. 134), "damrakgerioù" (GOULVEN PENNAOD in La-11 153), "gerioù implijet evel rakger" (F. KERVELLA, *ibid.*, *id.*; ROPARZ HEMON), h.a. Souezh ebet enta e ve ken disheñvel niver ar rakgerioù renablet er yezhadurioù klasel : 170 e VALL, 90 e YBRB, 41 e GRBH, 121 en *Ar Stourmer*, h.a.

En un doare pleustrek loc'homp eus an despizadur divrazañ -mañ :

*Ar rakger zo un unvez c'heriadel o kediañ gant un unvez c'heriadel all war c'henel un unvez c'heriadel nevez* (La-15 16).

An eil unvez c'heriadel — ar pennrann — a c'hell bezañ ur verb, ur pennanv, un adanv.

Penaos e vez kediet an eil unvez ouzh eben ?

An unvez c'heriadel kentañ a zegas a-wechoù ur c'hemmadur en eil unvez — komz a reer neuze a elfenn gemmeiat hag a elfenn gemmadus — hag a-wechoù ne zegas ket. Kemmañ pe ankemmañ, *that the question...*

Neuennadoù e-leizh a gaver e par hon diaraogerion :

#### F. Kervella :

"Gant an darn vrasañ eus ar rakgerioù e c'hoarvez kemmadurioù dre vlotaat. [...]. Ne c'hoarvez ket dalc'hmat an holl gemmadurioù avat. Setu perak eo mat reiñ roll ar rakgerioù anavezetañ gant ar c'hemmoù a lakaont da c'hoarvezout pe hep c'hoarvezout." (YBRB 142).

#### Roparz Hemon :

"Beaucourp de préfixes font subir au radical qui les suit les mutations par adoucissement". (GRBH 11).

"D'une façon très générale, on peut dire que tout mot employé comme préfixe tend à provoquer les mutations par adoucissement." ( GRBH 14).

Diwar ar 46 degouezh studiet e GRBH, n'eus nemet 12 diogeladur ("ne provoque pas de mutation" ;

"adoucit toujours" ; agit toujours sur" ; "n'agit pas sur") ha 34 neuennad ("agit parfois" ; agit en général" ; "peut agir" ; "peut adoucir"). (*id.* pp. 12-14).

Penaos e c'hell hevelep stadadennoù deskrius degas sklerijenn d'an arveriadeg o pleustriñ dre ar yezh war un dachenn arbennik

Da bareañ hevelep neuennerezh, ez eus bet kinniget gwellaennoù e kerz istor ar yezh.

VALLÉE a erbede endeo "rétablir l'ordre au moins pour les nouveaux composés" (VALL XXIV).

### Goulven Pennad :

"Evit a sell ar gerioù kevrennek [...] e vefe ret diferañ strizh ar reolennoù. An Ao. HEMON, gant furnez, a vir o doare-skrivañ henvoazel d'ar gerioù kevrennek kozh ; hogen ne heuilh ket atav reolennoù strizh pa vez ret stummañ gerioù nevez. [...].

"Meur a wech on chomet souezhet me ivez dirak disoc'hoù zo bet roet gant an Ao. HEMON en deus moarvat abegoù sonn evit o dibab, ken on deut da sevel "evidon va-unan", oc'h emharpañ war *Grammaire bretonne* HEMON, e c'heriadurioù, *Yezhadur bras* F. KERVELLA, *Grand Dictionnaire* F. VALLÉE ha, nevesoc'h, *Le vieux breton, éléments d'une grammaire* L. FLEURIOT, un dibab "reolennoù" a glaskan heuliañ eus va gwellañ." (*Ar Stourmer 15-16*, p.129).

An dro-mañ ez eus anv a ziskoulmoù erskrivus :

~ mirout o doare-skrivañ henvoazel d'ar "gerioù kevrennek kozh" (sl. ivez La-08 299)

~ diferañ strizh ar reolennoù evit stumañ an nevezc'herioù.

"Ha n'eo ket deuet ar mare", a aters YANN-BAOL AN NOALLEG, "da reiñ un taol skubellenn er c'hemmadurioù war-lerc'h ar rakgerioù, *da reiñ reolennoù* ? Rakwelout a ran ur prantad turmudus war dachenn ar sevel gerioù er bloavezhioù o tont. Deuet mat e vo seurt skoueriekadur." (La-17 380). Ha GUY ÉTIENNE da respont : "Ya, dav eo peurstardañ ar serjantoù e par ar c'hemmadurioù diabarzh" (La-17 381), ha da ouzhpennañ : "Ya d'an taol skubellenn roet d'ar stummoù dizunvan (evel da skouer ar c'hemmadurioù goude *dreist-*) ; ya ivez avat d'an nemedennoù gwriziennet (evel da skouer *etrevroadel, eilgevor*) daoust ma rankor plediñ gant pep degouezh ha kevareizhañ a-wechoù (GE da GC 29 VI '07 diembann).

Azetet emañ ar sturyezhañ, — evel pep arz — war ar c'halvezerezh hag ar c'halvezerezh zo reolennoù da gentañ penn" (La-08 166), met c'hoarvezout a ra ivez d'ar yezhañ — evel da bep arz — troziñ ar reolennoù, pe ac'hoel lakaat harz d'ar reolennoù (*id.* 33). Betek pe bar e c'hell ar reolennoù bezañ trozet ?

Dislank etre skod ster ur rakger ha skalfad an durc'hadurioù ster anezhañ in La-17 92-93

Bevennoù a vez d'ar reolennoù avat.

Da gentañ penn ar boazioù en arver abaoe kantvedoù a-wechoù.

"Gant furnez" e kinnig ROPARZ HEMON mirout "o doare-skrivañ henvoazel d'ar gerioù kevrennek kozh" ha GUY ÉTIENNE a erbed ivez degemer an termenoù — na pa vent nemedennoù — gwriziennet mat er yezh (La-13 70).

D'an eil, e vez kavet bevennoù soutiloc'h : c'hoarvezout a ra d'ar yezhañ — evel da bep arz — troziñ ar reolennoù, pe ac'hoel lakaat harz d'ar reolennoù (La-08 33). Betek pe bar avat e c'hell ar reolennoù bezañ trozet ?

Diemglevioù a sav etre "gouezoniourion" o tifenn reolennoù strizh e anv ar poell reizhistorek ha "barzhed" oc'h ober e lec'h d'ar santerezh arzel (La-12 276-283 ; La-17 92-93).

Mar 'm eus meneget an tennderioù a sav etre an daou savboent eo evit na ve dihentet betek re an arveriadeg a-dal da furmoù a c'hallfent barn evel "faziek".

En un doare hollek hon eus despizet ar rakger *unvez c'heriadel o kediañ gant un unvez c'heriadel all* ha meneget ar c'hemmadennoù degaset gant an elfenn gemmeiat d'an elfenn gemmadus.

**Fazioù hon diraogerion a gaver ezvrezeliad "remords de grammairien" (Gagnepain) gourfennger ha gourfennc'her ; mammiliz hag iliz-vamm Amkan ar rakgerioù : La-09 385 ; La-14 182 ; La-11 48 ; La-17 76 a-z de- ; La-17 92, 380; arc'hwel diforc'hekaat in La-14 200 hag in La-11 46; hogozen in La-16 353**

Da ziwall diouzh neuziadur a stil gant Al. Zwangsverschleppung in La-12 117. Sk *delwenn* in La-08 166

## MELLEGEZH HA DIVELLEGEZH

Anezho furmoù kurzhet eus *mellsteriegezh* ha *divellsteriegezh* a-getep.

Anv ez eus bet er c'hevarad a-uc'h ag ar rannig *re-* aet gwech da rakger *mellek*, gwech da rakger *divellek*.

"Ul luniad mell(steri)ek zo dezreadus e ster diwar ster e gedrannoù, pezh nad eo ket ul luniad divell(steri)ek pa forc'h e ster diouzh ar ster gortozet diwar zezrann e luniadur." (La-08 31, 301 ; La-16 93). Skouerioù :

~ ul luniad mellek : *leddivezouriezh* : aes eo anaout *led* ha *divezouriezh*

~ ul luniad divellek : *dial* = *di-* + *gal* : diaes eo anaout *di* ha *gal* (sl. stambouc'hañ in GIBR)

Cotten = kozh den, Cozanet = Kozh ganet (gouez da Fleuriot) ; amezeg = am + nes + ek in YBRB 458.

Diwar-bouez an hevelep kedrannoù zoken, e c'hell ar yezhour sevel daou liesgeriad disheñvel. Skouerioù :

1) ad- + talañ : *adtalañ* luniad mellek (talañ un eil gwech) ; *atalañ* luniad divellek (merkañ ur c'heñver a barder etre kementadoù) nad eo ket dezreadus e ster diwar ster ar c'hedrannoù ;

2) di- + gounit : luniad mellek *dic'hounit* (hep gounid) ; luniad divellek *diounit* (reiñ ul lia d'ur gouziviad).

## DAZVELLEGEZH

UR C'HEAL GOUNEZET gant ur gedrann en unan eus he arverioù o chom ganti en he arverioù all. La-17 355

Forzh pe c'her, dre ma 'z eo bet kediet ouzh un all a c'hell tizhout un durc'hadur ster nevez pell pe belloc'h diouzh e ster digent, ha hevelep diruzadur ster a c'hell "tredizhañ" an holl zeveradoù . Ar ger *hont* da skouer arveret evel rakger a goll ar ster en doa evel diskouezell hag a c'hounez durc'hadurioù ster nevez el liesgeriadoù : Et. extra- : *hontlavar* ; Et. meta- : *hontved* ; Et. supra- : *hontistor* ; Et. ultra- : *hontyezh*, h.a. (La-08 206 ; La-15 23 ; La-16 93 ; La-12 117)

An dro-mañ ez eus anv a ziskoulmoù erverkus :

~ mirout an doare-skrivañ kenvoazel d'ar "gerioù kevrennek kozh"

~ diferañ strizh ar reolennoù evit stummañ gerioù nevez.

Klokaet e voe kinnigoù **Goulven Pennaod** :

~ renabliñ ar c'hemmadurioù hervez o orin ha dreist-holl oad al luniad (arvez deskivadurel)

~ perzhekaat er sturyezhañ ar c'hemm etre ar c'hemmadurioù disheñvel, da skouer evit kevenebiñ luniadoù mellsteriek ha divellsteriek (arvez erskrivadurel) (Sl. amañ a-us ar c'hevarad *Mellegezh*, *Divellegezh*).

A-raok imbourc'hiñ a-zivout ar c'hemmañ pe an ankemmañ e ranker sevel ur rummadur azas eus ar c'henstrolladoù. Un diverra ne ginnigin ken dre ma 'z eo bet studiet dre ar munud e notennoù LAVAR. (Sl. e La-17 315 hh. pergen ar studienn savet gant GUY **Guy Étienne**).

## STERIEGEZH UR GER (KRER) HA DURC'HADUR STER UR RAKGER



Ken abred ha 1979 e voe lakaet e gouloù *galloud steriañ* liesek rakgerioù 'zo o wiskañ "kement a arlivioù ster ha ma 'z eont d'ober a c'herioù." (La-07 71).

Diwezhatoc'h e voe anv a *zurc'hadur ster* ar rakgerioù. (La-10 92, 93).

Donaet e voe ar studi ha lakaet kemm etre *steriegezh* ur ger ha *durc'hadur ster* ur rakger :

Hiziv dre ar c'herienn *ger krer* ez intenter ar ger a greizer an evezh warnañ dre ar studi (geriadurezh, yezhoniezh, h.a.), eleze ur ger eztennet diouzh ar realezh.

Da bep ger krer e vez ur *steriegezh*, eleze un teskad sterioù galloudel a-geñver gant an holl arverioù en deus er realezh.

Skouer : gant an un araogenn *grer ouzh* ez eus sterioù kevarall, enebet zoken. Petra boutin e-keñver realezh etre *ober goap ouzh* ha *kaout truez ouzh* ?

Ar rakger, e gin, a gemer perzh er realezh, n'eo ket war-eeun, distag, met evel kediet, dre hantererezh ur c'hediad : evitañ ne gomzer ket a *ster* diwezhel met a *zurc'hadur ster*.

E gerioù all, e vez *steriegezh* ur ger (verb, anv) amparet gant ur graoñell ster soliet war keñverioù stabil etre an den hag ar bed, hag ur rodennad *durc'hadurioù* hep sol c'hoazh. Ar rakger, *ouzh* kemm, n'eus gantañ kraoñell ster ebet met eginoù ster hep mui. (La-11 129 ; La-15 17)

Skouer : nivlennad *durc'hadurioù* ster ar rakger am- :

"en-dro da" : *amgalonenn* ; "e-kichen" : *amezeg* ; "en erlerc'h ouzh" : *amsaviñ* ; "kevarall" : *amliv* ; "damnac'h" : *amlavar*, *amzileizh* ; "damziouer" : *amc'houlou* ; "nann" : *amhouarne* ; "an eil hag egile" : *amrev* ; "er-maez ha tro-dro" : *amarvevad*, h.a.

Ar geriadurour a zeskrivo ar perzh en deus *am-* e pep hini eus ar gerioù meneget, o tigej e se ur skalfad kemeradurioù ; gant ar steradurour e vo dezrannet hemañ war glask d'ar vrasañ rannster voutin, da graoñell ster ar rakger. (La-10 90). Hogen pezh zo c'hoarvezet en tremened a c'hoarvezo en dazont ha, hep mar, e tifluko deiz pe zeiz kemeradurioù na c'hellomp ket rakwelout hiziv ha ret e vo kevraokaat ur skod ster nevez. Ken ma c'hellomp lavarout adal bremañ ne dalvez an "*durc'hadurioù ster*" o revout en taolenoù da heul nemet evit stad vremenel ar yezh.

## Eil elfenn al liesgeriad in La-11 81

### DIGORADUR

E 1997, war atiz un nebeud kenlabourerion, e savis ur studienn a-zivout ar rakrannoù boazietañ. Dasparzhet etre ar geneiled, e chomas diembann va labour. Sed a skrivis d'an ampoent :

"Al lenner a gavo amañ ur studienn verr diwar-benn arver ar rakgerioù ha rakrannoù boazietañ. Ur pleustrad bihan n'eo ken dezhañ ar pal da aesaat labour ar studierion hag an imbourc'herion a gavo ennañ :

~ roll ar pennadoù ma'z eus meneg eus ar rakger-mañ rakger.

~ roll ar c'hemmadurioù arveret boas da heul ar rakgerioù studiet.

~ skouerioù ar brezhoneg arnevez pergen."

Diaesterioù a savas pa voe anv a renabliñ ar c'hemmadurioù da zegas da heul ar rakgerioù. Vallée ne bled ket gant ar gudenn (VALL XXVIII-XXXVIII). Merzhout a ris pegen bresk e oa ar c'hinnigoù graet gant Roparz Hemon pe F. Kervella war an divoud.

Ar yezhadurourion a lak kemm etre ar rakgerioù "gwirion", araogennoù an darnvuiañ anezho, hag an elfennoù liesseurt arveret evel rakrann anezho ur pennanv, un adanv, un adverb, un niver, ur rannig, h.a.

E-touez ar rakgerioù, reoù a vez strujus "rakgerioù gwiron" anezho "eleze o tougen un durc'hadur ster bet amparet e-kerz istor ar yezh, sk. *gour-*, *gou-*) ; re all n'int ket gwir rakgerioù (n'o deus [evit c'hoazh] durc'hadur ster ebet, zo meni hapaksou, sk. *sin-* [...] hag, er stad m'emaint, ne c'haller ket ober ganto evel rakgerioù)." (La-15 13, 14).

Rakrannoù kedellet : La-12 276.

A-zivout dreist, sl. dreistgwir. hag ivez dreistgwisk (pe dreistwisk ?) gant Ar Glev

**2 Kemmañ pe ankemmañ ? Pe gemmadur goude ar rakger-mañ rakger ? Pe gemmadur diabarzh en ur c'henstrollad**

Pe gemmadur ? goulenn digant GC in La-12 276 ; digant YBAN in La-17 315, 380 ; digant IK in La-10 189 hag in La-13 13, GC in La-12 276, LM in La-17 92, MME, MC

Seurt goulenn a reer pa vez anv a c'herluniañ (La-12 277 : "[...] c) hag un diskoulm poentel zo da reiñ hep arc'hañ evitañ staelad ur reolenn." Sl. degasadenn GP "ec'hstae" : "Evit ec'hstae [...] a zo chañsoù gantañ da wriziennañ, met a dra sur n'eo ket da vezañ danvez ur reolenn" GE GC 09 IX '07).

